


niv. 33/34

MAE-MEZHEVEN-GOUERE-EOST 1985

24,00 lur

GOUEL AR
FILMOU HAG
AR SKINWEL
KELTIEK
P. 53



AN EMSAV
E KERNEV.VEUR
P.15

BREST,
AZENOR
HA TUDU,
P.45

KEMBRE 85
P.6

YEZH
P. 38

NIVERENN HANV

PENNAD-STUR

Kavout a rae deomp hon dije gellet kinnig d'hon lennerien ur pezh teullad war enframmatadur *Diwan* ha *Seaska* en deskadurezh Stad. Kavout a rae deomp hon dije gellet lakaat dirak ho taoulagad testenn krouidigezh ur C'h.A.P.E.S. brezhonek divrall ha digemmesk. Tra !

Chomet sac'het ar c'harr el lagenn ! Daou reizh-poell krennnebet tal ouzh tal, hini ar Jakobined ha n'o deus da ginnig nemet hollec'halloudegezh an deskadurezh Stad kreizennour, dinac'het ganto ar gwir kent da vezañ disheñvel, hag hini ar re a zifenn pennek frankiz hor yezh en ur glask diframmañ digant ar Stad ar pezh a zo ret d'hon sevenadur da veañ. Pell zo ne oa ket bet klevet komzoù ken impalaerelour e beg ur ministr, en hini ministr ar deskadurezh, mar plij, hag en deus kredet lavarout diwar-benn ar c'horseg e oa arabat deskiñ d'ar re yaouank yezhoù ne gasent da neblec'h. Sed aze ar vroadelourien c'hall, bez' maint ganti, ruz o c'hribenn, oc'h embann gwirioù peurbadel ar galleg a-enep ar yezhoù a vac'h. Ha da belec'h 'ta e kas ar galleg, Aotrou Chevenement ? War strishaat bemdez e ya e dachenn, koulz douaroniezhel ha yezhel, ha war vreiñnat ivez, krignet muioc'h-mui gant ar saozneg marlonk... Ma'z eus ur yezh etrevroadel, hiziv an deiz, n'eo ket ar galleg eo, ar saozneg ne lavaran ket. Nann, ar vroadelourien c'hall n'int ket evit degemer an impalaerouriezh war o yezh pa waskont-int war re ar re all, ar re vihan aze, ar re a vouger didrouz. Arabat kredin e yelo war laoskaat politikerezh hollec'hallek ar gouarnamant, forzh pe hini e vefe... Seul vui e washao d'ar galleg, seul vui e vint prest d'e zifenn. Ne fell ket dezho kompren, ha dallet mat ez int ouzhpenn, n'int ket evit meizañ ez eus kumuniezhioù all en o bro unvanet, dizisrannus ha peurbadel, kumuniezhioù tud o deus ar memes gwirioù yezhel ha reoù ar galleg. Setu perak ez eo a-bouez tremen dreist ar C'hallaoued ivez evit brudañ ar gwakerezh war hor yezh ha kaout harp ha gwarez an aozurioù etrevroadel a zifenn ar yezhoù bihan. Un unvaniezh european a chom da gas da benn, hini stourm ar yezhoù ha sevenadurioù gwasket !

AL LANV ■

D'AL LENNERIEN

Kalz a zale a zo ganeomp ur wech ouzhpenn. Ho pedin a reomp d'hon didamall eta... Dont a reomp, a-benn an diwez, da bourchas deoc'h danvez lenn fonnus ha, spi hon eus, plijus ha kelousar war un dro.

Daoust ma ne vezer ket re duet en hañv gant al labour sirius en ho pedomp memes tra da gaout soñj ez eo koumanantit e koulz ar gwellañ doare d'hon harpañ. Trugarez d'hon lennerien feal ha bezit war soñj kavout deomp koumananterien all. An embann a zo ur stourm a-bouez ivez...

TAOLENN
AL LANV niv.33/34

Kemennadennoù	2
Pennad-stur	4
Tresadenn Kargedoull	5
Lizhiri al Lennerien	5

KELEIER ETREVROADEL

KEMBRE Testeni-diavaez er Skol-Veur <i>Cynfael</i>	6
Efed divizoù Thatcher <i>John Idris</i>	7
Barzhoneg An dorzh a vo ingalet <i>Jean-Luc Dey</i>	9
Kaav Tri C'hembread Meur aet da Anaon <i>Padrig an Habask</i>	12
En berr	14
Delfeil de Ton <i>Leonid Rosko-Pouding</i>	14
KERNEV-VEUR An Emsav <i>Morwenna Jenkins</i>	15
BT Ar roue Kofok <i>Tadevab</i>	15
AZIA Broioù an Himalaya <i>T.B.</i>	22

BREIZH

Barzhoneg Erwan Martial Menard	28
SEVENADUR	
Mirdi ar Silmioù <i>Paskal ar Marc'heg</i>	28
Choarioù Gerioù-Kroaz <i>Job</i>	29
Treger Tregren Tregret <i>Diry Kerwella</i>	30
1986 <i>Jili Boucherit</i>	30
An digreizennañ hervez E. Hervé <i>Herle Denez</i>	31
... ar mor <i>Herle Denez</i>	31
Lennadur Biskoazh ma lunedoù <i>Daniel Doujet</i>	32
Disoc'hoù ar gerioù-kroaz	33

KEVREDIGEZH

C'hoantegezhioù bert <i>Loeiz ar C'here</i>	34
Gerioù bugale <i>Daniel Doujet</i>	36
BT Ur c'hi bihan gwenn ha du	36

YEZH

Emgleo-Breiz <i>Padrig an Habask</i>	38
Stambouc'h <i>Loeiz ar C'here</i>	39
Skridvarn al Lanv	41
Gourarc'homp hor gwir <i>Tugdual Kalvez</i>	42
Louisiane, "Couche-couche" ha "gombo z'herbes" <i>Jean-Luc Dey</i>	43
BT Konkou <i>Tudu</i>	45
Fiñskudennerezh C'hwec'hvet gouel ar filmoù <i>Herle Denez</i>	53
Bannoù-Treset <i>Gi-Eder Fontanella, Leonid Rosko-Pouding,</i> <i>Loeiz ar C'here</i>	63
Sonerezh <i>Led Zeppelin Tim Ogouboul</i>	67
Kousk Breiz-Izel <i>G.E. Fontanella</i>	68
Fiñskudennerezh	69
Koumanantit !	70
Choariomp <i>Martial Menard</i>	71
BT Yannig Pennkalet <i>Bleiz Koadaroc'h</i>	71
Kañvoù <i>Tadevab</i>	72

AL LANV CPPAP 62602 ISSN 0246-5396 Eost 1985
kelaouenn diskleriet hervez lezenn
rener : **Padrig an Habask**, Ti-moulañ : **du Marin**, ar Gelveneg
Al Lanv 8 straed Enez-Vaz 29000 KEMPER
Koumanantoù : ordinal 70,00 lur, skoazell adalek 100 lur



LIZHIRI AL LENNERIEN

Lec'h ar pep tra deomp-ni
Setu, etre gerioù all, ha goude bout
nanet nozvezhoù skrijus-pad o prede-
riañ war an dra, ar ger embregus-kenañ
'ha fraezh-meurbet a gredan kinnig,
z-benn an diwez, da lennerien "Al
Lanv" : pluigormigellustadinellezh.
Gouzout a ouzon evrat eo hennezh
luziet a-walc'h, hogen gwelloc'h eo
eget tra ebet. Ar ster anezhañ n'eo
ket bet dizezet restis evit ar mare.
Dont a rano mourvat, me 'gral, ur
wech dilestret ar wag a hije un nebad
Bretoned o c'hortoz hervez doare.
Evelato e c'heller goulkaat endeo e

vo ster ar ger-se, un arliv bennak etre
"usvedoniezh" ha "trabedoniezh".
Ma'z int a-du gant war ar c'hraf-
mañ, e rivoano buan, hen touñ, ur
pep-hini-ere a vrezhonegerien a-zoare.
Sezour !

Jili Boucherit (Roazon)

Kembre

CYNFAEL

JOHN IDRIS

PADRIG AN HABASK

Aozadur un testeni-studi diavaez e Skol-Veur Kembre

Pemp bloaz 'zo, e miz Gwengolo 1980, e voe degemeret ar studieren gentañ da brientiñ testeni skol-veur Kembre dre ar yezh kembraek, ha kement-se o labourat er gêr. Dedennet e vo moarvat lennerien *Al Larn* o c'houzout emañ ar brezhoneg e-touez an danvezioù kinniget en aozadur mes dennet e vint muioc'h c'hoazh, a dra sur, gant an doare ma voe lakaet stummoù kelenn ar skol-veur da zereout ouzh ar palioù nevez-mañ.

Kelenna skol-veur Kembre Aberystwyth an hini eo a ginnig an heuliad studi-mañ ha kreizet eo ar prientiñ en Aberystwyth. Aberystwyth a zo unan eus an daou gelennva skol-veur e Kem-

bre (Bangor eo an eil) a reas o mad en amzer dramenet eus an arc'hant roet gant Bodad Yalc'hadoù ar Skolioù-Meur (ar bodad a ingal arc'hant ar skolioù-meur e Breizh-Veur) da ervel kelennierien skol-veur aratozh evit kelenn e kembraeg. Abalamou d'an dibaboù niverus all ha d'an tailhañ a-berzh ar gouarnamant war an dispignoù e voe krennet ar c'hresk-se hag a-vec'h ma weler hiziv kelennierien all da vezañ anvet en amzer da zont nesañ da ledanaat ar prientiñ dre ar c'hembraeg evit ar studieren a zegouezh er skol-veur. Kalz anezho, evel just, goude bezañ bet o deskadurezh eil derez evit ul lodenn pe evit al lodenn vrasañ kelennet dre ar c'hembraeg.

En Aberystwyth e kinniger d'ar studieren diabarzh heuliadoù studi dre ar c'hembraeg e danvezioù evel ar re-mañ : Istor, Istor Kembre, Douaroniezh, Deskadurezh, Politikerezh, Galleg, C'hoariva, Sonerezh, Heuliañ a reer ar studioù-mañ en doare henvoazel, dre zareprediñ kentelioù ha bodadegoù-studi. War ziaez an heuliadoù-studi-mañ e voe savet kentelioù da gas d'an testeni-arnod evit ar studieren ne c'hellent ket en em enskrivañ er skol-veur leun amzer. Studiañ er gêr a reont eta, war o amzer-vak. Tu a zo da studiañ an danvezioù da heul en heuliad-studi-mañ : Kembraeg, Brezhoneg, Deskadurezh, Sonerezh, Istor Kembre, C'hoariva, Studioù relijiel.

Heñvel eo danvez ar c'hentelioù heuliet gant ar studieren diabarzh ha gant ar re a ziaevaz, ar memes kelennierien a ra war-dro ar c'hentelioù. An doare deskiñ eo a c'heriñ. Ur prientiñ-tadur disheñvel a zo, savet aratozh-kaer evit ar studieren a ziaevaz, notennoù, levrigoù, teuliadoù, rolloù-levr-lennadurezh ha dreist-holl kentelioù war gasedigoù. Dre bellgomz e chomer e darempred gant ar studieren. Ur splet bras eo lec'hiadur douaroniel Aberystwyth e-kreiz Kembre. Daoust d'ar studieren bezañ strewet eus an eil penn d'egile da Gembre, n'eus ket unan ne c'hellfe ket aes a-walc'h dont da Aberystwyth da heuliañ Skol ar Sadorn a vez dalc'het reoliek a-hed ar bloaz gant bodadegoù-studi, kentelioù, divizoù war dezennoù ha digarezioù da ziskoulmañ ar c'hudennoù a sav war o

Skol-Veur Bangor

hent. Sed aze un darn a-bouez eus an darempred studier/kelennet.

An doare da gelenn a zo disheñvel eta ; disheñvel ivez hed an heuliad-studi. Ar studieren diabarzh a enroll er skol-veur hag a dap o zesteni-arnod e tri bloaz peurlvuiañ mes rannet eo bet ar c'hentelioù evit ar studieren a ziaevaz war bemp bloaz ha gellout a reont kemer betek nav bloaz da gas o studi da benn.

Niver ar studieren, eus pederh e teount 7 Pelloc'h ez eus war-dro 45 enskrivet hag ar re gentañ anezho a zo da echuiñ gant o studi ar bloaz a zeu. Dre ma n'eus ket a gelennerien d'ober skol d'ar studieren a ziaevaz hepken, e vevner niver ar re enskrivet bep bloaz a-benn gellout ober eus ar gwellañ war-dro pep hini.

A bep lec'hiad hag a bep implij e teu ar studieren. Kalzik a gelennerien a zo en o z'ouez, mes marc'hed-tiegezh a gaver ivez, labourerien sokial, sekretourezed, labourerien-douar ha tud aet war o leve. Da heul e kaver a bep seurt oadoù e-touez ar studieren. Disheñvel eo ivez live o studioù skol-veur, lod tapet ganto testeniou skolioù-meur all dia hogen n'eo ket distank ar re o deus kuitaet ar skol yaouank. Ar re-mañ a wel er prientiadur un tu da gaout ur c'hañs n'o deus ket bet. An dedenn eo a vroad kalz anezho daoust ma wel kalz eus ar re yaouankañ un tu dre-se da c'hellout tizhout micheerioù nevez dre berzh an testeni-arnod.

Gant niver an dud dilabour o kreskiñ spontus, an emdennañ abred war al leve boutinoc'h-boutin hag an amzer vak o kemer ur ster nevez en amzer ar fritez silikon, e teu an doare-mañ da zeskiñ er gêr da leuniañ un toull a-bouez. Ken pouezus all eo e vefe graet dre ar c'hembraeg (hag ar brezhoneg).

CYNFAEL

dan lyn james

KENTELIOÙ
KEMBRAEC
KOMZET



ober

Efed divizoù Thatcher war an aozadurioù lec'hel



Skolioù-mamm Bro-Gembre

Rannet eo Kembre e kontelezhioù eo karget o c'huzulioù dilennet da zivizoù sokial lec'hel ; da skouer stad an hentoù hag ar servijoù kevredigezhel. Izili ar c'huzulioù-mañ a zo ivez dileuridi ar bobl er c'huzuladegoù gant Aozadur Lec'hel ar Yec'hed, gant Bodad an Dour ha gant Bodad an Tredan er rannoù-bro. Aozadurioù Lec'hel ar Yec'hed a resev arc'hant war-eeun digant Sekretourva Kembre. War Aozadurioù Lec'hel ar Yec'hed e weler anat efed divizoù Sekretourva Kembre, divizoù Thatcher eta ; tra ma c'hell ar c'huzulioù kontelezh kemerout un deog war gwerzh an tiez ha kaout eta un tammig arc'hant diouzh o zu. N'eo ket kement eta ar c'huzu-

lioù lec'hel dindan dalc'h yalc'hadoerien ar gouarnamant. E gwirionez e talvez divizoù Thatcher da zigreskiñ an dispignoù boutin kement hag ur c'hrennañ war levedoù an Aozadurioù Yec'hed hag ar c'huzulioù lec'hel ivez.

Mare zo bet e veze gopret tud da droc'hañ ar foenn a gresk war ribl an hentoù. Ne reer ket mui hag evel just e weler foenn ha geot o poulañ spontus. N'eo ket un dra fall-du en holl rak gwelout a reer kalz muioc'h a vleuv gouez a-hed ribloù hentoù Kembre eget na oa bet gwelet abaoe dek vloaz ; kalz muioc'h a dud dilabour a weler ivez. War washaat e ya stad hentoù Kembre, ne vez ket graet al labour kompenn a zo ret a-benn o derc'hel e stad vat.

**«Laboused An Arvor»
Ul levr kaer
troet diwar
ar c'hembraeg
gant
Mouladurioù
Al Lanv**



Dafydd ha Meinir ha voe toulbac'het evit ur bloaz tra ma pakas Lleucu 100 eurvezh a labour kevredigezhel. E Londrez e voe dalc'het burevioù ar "City and Guilds" da lavarout eo ar bodad a ra war-dro arnodennoù ar skolioù teknek, gant 20 ezel eus ar *Gymdeithas*. E Bangor e voe aloubet burev deskadurezh Sekretourva Kembre. E Gwent e voe dalc'het burev John Stradling Thomas, an den e karg eus an deskadurezh e Sekretourva Kembre. 32 eus izili ar *Gymdeithas* a voe harzet e Llandrillo en hanternoz Kembre goude bezañ aet e-barzh burevioù ar gouarnamant eno ha bezañ graet distruj ha dizurzh publik.

Pelloc'h — e miz Mezheven 1985 — eo en em vodet Sekretourva Kembre gant izili *Cymdeithas yr Iaith Gymraeg*. Sur awaloc'h e oa danvez e respont Sekretourva Kembre rak divizet he deus *Gymdeithas yr Iaith* paouez e-pad c'hwec'h miz gant hec'h oberiantizoù war-eeun. Gwelet e vo hag-eñ e vo ur c'hammed war-raok etretek krouidigezh ur Bodad da Ziornen an Deskadurezh Kembraek pe un doare nevez da Sekretourva Kembre d'e nac'hañ.

**HARZ-LABOUR
AR C'HIAOUERIEŃ**

War-lerc'h ur bloavezh diskrog a-enep divizoù ar Bodad Glaou ha Thatcher diwar-benn dazont ar greanterezh (serriñ ar mengleuzioù) e voe rediet ar c'hiaouerien da zistreiñ d'o labour e miz Meurzh ar bloaz-mañ. Pouez an diouer a arc'hant hag ar stlennañ kelaouiñ a zo penngriek eus se. A-raok d'ibenn an harz-labour e oa distroet ouzhpenn 40% eus ar c'hiaouerien d'o labour. Lavarout a raent n'o doa mui a arc'hant da baeañ o zi, da voueta o familh ha ne oant ket plijet gant renerzh Arthur Scargill — Renev Unvaniezh ar C'hiaouerien, Lakaet e voe ar c'hiaouerien da loened gouez gant ar c'helaouennoù pemdeziek. Ne gant stourm ar c'hiaouerien da zerc'hel bev kumuniezhioù ar mengleuzioù.

**RADIO BRO DREGER
(Radio Pays de Trégor)**

Un abadenn vrezhonek nevez !
bep Sul adalek miz Eost
1.00 e. - 2.00 e. goude kreisteiz

**ETRE KEUZ HA REUZ
(Sklerijenn Bro Dreger)**



E kreisteiz Kembre ne oa distroet nemet 2% eus ar c'hiaouerien d'o labour a-raok diwez an harz-labour. Kalz izeloc'h e oa ar feur-mañ eget war dachenn mengleuzioù all Breizh-Veur War-dro 20% a oa distroet ar Yorkshire zoken — kreñvlec'h Scargill.

Abeg pennañ k'adarnegzh glacourien kreisteiz Kembre, sur awaloc'h, eo o emskiantegzh politikel hag ar skoazell o deus bet digant pep rann eus ar gevredigezh e Kembre. Emskiantet mat e oant ivez eus an efed da serriñ mengleuzioù glaou war gumuniezhioù bihan ar c'hreisteiz. E-korf an 30 vloaz diwezhañ ez eus marvet kalz a gêria-dennoù bihan e traoniannoù mengleuziek kreisteiz Kembre goude ma oa bet serret ar vengleuz. Alies e oa ar vengleuz pinvidigezh nemet an draonienn.

Pelloc'h eo distro ar c'hiaouerien war o labour, n'eo ket echu koulskoude gant ar stourm da zerc'hel digor ar mengleuzioù. Er Yorkshire ez eus anv

a serriñ peder mengleuz hag e kreisteiz Kembre unan pe ziv ivez. Arthur Scargill a zo prest da vont de'i adarre. Men dare avat hag-eñ eo prest ar c'hiaouerien da vont d'e heul. Gwelet e co petra a c'hoarvez c'hoazh.

JOHN IDRIS

Luc'hskeudenn eus harz-labour ar c'hiaouerien er bloavezhioù '80. Ar memes tra hag er bloavezhioù '80. Unanet eo bet tud Kembre gant stourmad ar c'hiaouerien, labourerien-douar, mengleuzerien pe gelennerien, merc'hed er gêr pe tud dilabour. Kembraegerien pe digembraegerien en un doare ne oa ket bet gwelet abaoe pell a oa.

Y FANEE
Baner ac Amserau Cymru

'A Strike-breaker is a traitor'

'Blacklegs' yng Nghwm Garw, De Cymru ym 1929

"Unodd brwydr y glowyr y Cymry, boed ffermwyr, lowyr neu athrawon, boed wragedd neu'r diwaith ... yn Gymry Cymraeg a di-Gymraeg, mewn ffordd na ddigwyddodd ers tro byd."

Kañv

TRI C'HEMBREAD MEUR AET DA ANAON

Kollet he deus Bro-Gembre er mizioù diwezhañ-mañ tri den meur eus hec'h istor. Kate Roberts, skrivagnerez romantoù ha danevelloù hollrudet, Thomas Parry, kelenner ha lenneg-meur hag Harri Gwynn, den a skinwel donezonet-draist. Dedennet e vo, hep mar, kembraegerien ha danvez kembraegerien Breizh gant o buhez hag o oberoù. Salv ma talvezo an notennoù-mañ da reiñ dezho c'hoant da vont pelloc'h ganti!

kentañ a zanevelloù berr, *O Gors y Bryniau* (Eus Yeun an Túrumbelloù).
 1927 Embannidigezh *Deian a Loll*.
 1928 Dimeziñ a ra da Morris T. Williams, eus ar Gwelon e kontelezh Caernarfon.
 1929-31 Mont a ra da chom da Riwbeynia ha da Donypand goude.
 1929 Embannidigezh *Rhigolau Bywyd a Storiâu Eraill* (Regennoù buhez hag istorioù all)
 1930 Embannidigezh *Laura Jones*
 1935 Dont a ra da chom da Ddinbych, prenañ a ra ti-moulañ "Gee" hag ar gelaouenn "Y Faner".
 1936 Embannidigezh *Traed Mewn Cyffion* (Tred potailhet)
 1937 Embannidigezh *Ffair Gaeaf a Storiâu Eraill* (Foar Goañv hag istorioù all)
 1946 Marv he fried
 1949 Embannidigezh *Stryd y Glap* (Straed ar Glakennerezh)
 1950 Degemeret da Zoktoez war al Lennegezh e Skol-Veur Kembre.
 1956 En em dennañ a ra war leve eus he labour e burev Y Faner.
 1956 Embannidigezh *Y Byw sy'n Cysgu* (Ar Vuhez zo o Koussket)
 1959 Embannidigezh *Te yn y Grug* (Te war an Dorgenn).
 1960 Embannidigezh *Y Lôn Wen* (An Hent Gwenn), darn eus danevell he buhez.
 1961 Medalenn a enor Kevredigezh ar "Cymmrodorion"
 1962 Embannidigezh *Tywyll Heno* (Teñval feno)
 1964 Embannidigezh *Hyn o Fyd* (Ar Bed-mañ)
 1967 Embannidigezh *Tegweh y Bore* (Kened ar Beure)
 1968 Priz kentañ Kuzul an Arzoù Kembraek.
 1968 Digoradur Skol Twm o'r Nant, e Dinbych, ar skol kentañ derez kembraek e voe-hi sekretourez he c'huzul ren.
 1969 Embannidigezh *Prynu Dol a Storiâu Eraill* (Prenañ ur verc'hoan hag istorioù all)
 1969 Embannidigezh *Kate Roberts ; Dastumad Triaŷ* (Emb. Bobi Jones)
 1972 Embannidigezh *Gobaith a Storiâu eraill* (Goanag hag istorioù all).
 1974 Embannidigezh Kate Roberts gant Derec Llwyd Morgan en heuliad "Writers of Wales" (Skrivagnerien a Gembre).
 1976 Embannidigezh *Yr Wylan Deg* (Ar Gouelan Brav)
 1976 Embannidigezh *Enais Clwyfus ; Gwlgw ar Walth Kate Roberts* gant

John Emyr (Ene doaniet : Sell war Labour Kate Roberts)
 1978 Embannidigezh *Erthygliau as Ysgriafau Llenyddol* Kate Roberts (Emb. David Jenkins) (Pennadoù ha Skridoù Lennegezh K.R.)
 1981 Embannidigezh *Haul a Drycin a Storiâu eraill* (Heol ha Korventenn, hag istorioù all)
 1981 Embannidigezh *Bro a Bywyd Kate Roberts* (Bro ha Buhez Kate Roberts) Emb. Derec Llwyd Morgan.
 1983 An Testeni Broadel a vez roet dezhi.
 1985 Mervel a ra e klañvidi Dinbych d'ar 14 a viz Ebrel.

Setu eta ur pezh buhezial labour-Legadiñ a ra Kate Roberts d'he c'henvroiz herzh hec'h arz, he yezh hag he bed. Ur skouer eo he danevelloù berr evit ar rumadoù yaouankoc'h, gouezet he deus mestroniñ an arz ken start-se a zere ken klok ouzh lusk ar vuhez vodern. Legadet ivez ur yezh eun, turniet-kaer, ganti e-leizh a droioù-lavar eus he bro, dreist-holl war an diwezhadou pa wele anezho en arvar da steuziñ e puñs an ankouac'h. Dezrevellet he deus pizh buhez an dud he deus anavezet, dre adkrouiñ istorioù diwar emzalc'h kevredigezhel an dud he deus darempredet. Kavout a reer ur skeudenn feal eus buhez kornbro he yaouankiz el "Lôn Wen". Hag hi divugale he deus gouezet skrivañ diwar-benn ar vugale goad o bed-int. Un dedenn bedoniel a oa ganti evit an dud, gouzout a ouie livañ dre ar munud o emzalc'h, o bed gant an holl draoù a oa war o zro. Tremen kaerder ar yezh kembraek a zo a-bouez evl-gvedigezh dianav a-walc'h deomp eo bet ivez. Mat e vefe d'ar d'ar C'here da skouer (Al Lanv 32) keñveriañ abafed puritan Kate Roberts pa vez kaoz a garantez en he levrioù, ar garantez e goudor-se, gant ar garantez ne vleugn ket evel geotenn ar Werc'hez. Ur stourmerzh dizehan eo bet ivez. Kate Roberts a-hed he hir a vuhez. Stourm evit ar strollad kembraek a reas, evit kaout skolioù kembraek, evit an embann e kembraeg, h.a. Arabat e vefe disoñjal he labour e "Gwasg Gee" hag ar c'hantadoù a bennadoù he deus skrivet e kelaouennoù kembraek liesseurt ha da gentañ penn evel just e "Baner ac Amserau Cymru". Ya, ur vuhezial leun-tenn gant un test meur eus an emskiantegezh kembraek an ugentved kantved.

KATE ROBERTS

Da gentañ Kate Roberts, unan eus kembreadezh brudetañ ar c'hantved-mañ.
 1891 Ganedigezh e Bryn Gwryfai, Rhosgadfan, e kontelezh Caernarfon.
 1904-10 Skoliadez e skol kontelezh Caernarfon.
 1910-13 Studierez e Skol-Veur Hantnoz Kembre e Bangor.
 1913-14 Kelenner e Skol Kentañ Derec Dolbadarn e Llanberis.
 1915-17 Kelenner kembraeg e Skol Kontelezh Ystalafera, e kontelezh Morgannwg.
 1917-28 Kelenner kembraeg e Skol Kontelezh ar Merc'hed Aberdâr, er memes kontelezh
 1925 Embannidigezh he dastumad



THOMAS PARRY

Un nebeud main-bonn a-hed buhez Thomas Parry. Ganet e voe d'ar 14 a viz Eost 1904 e Carmel e kontelezh Caernarfon. Mengleuzier ha labourer-douar bihan e oa e dad goude bezañ bet war vor en e yaouankiz. Yaouank c'hoazh ez eas da skol kontelezh Pen-y-Groes ha da Goleg y Gogledd e Bangor. Tapout a reas e desteni-arnod gant gourc'hemennoù e kembraeg hag e latin e skolaj ar renerien-skolioù e Caerdydd. Chom a reas eno tri bloaz ouzhpenn a-benn kaout e vestroniezh. E 1929 e teuas en-dro da Bangor evel kenteliar er Gervrenn Gembraek hag anvet e voe da gelenner skol-veur e 1947. E 1936 en doa kemeret da bried Enid Davies. Adalek 1947 e voe c'hwec'h vloaz kelenner skol-veur e Bangor a-raok bezañ anvet da levrour-ezher al Levraoueg Vroadel e 1953. Pemp bloaz goude e voe lakaet da bennrener Skol-Veur Gembre Aberystwyth. Unnek vloaz e chomas e garg-se a-raok mont war e leve da 65 bloaz en hañvezh 1969. Derc'hel a reas da gemer kalz perzh e buhez an Eisteddfod Vroadel goude (kadriad he c'huzul e oa bet e 1959-1960). Levier al Levraoueg Vroadel e voe eus 1969 da 1977 ha Levier a Enor Kevredigezh ar "Cymmrodorion" eus 1978 da 1982. Setu eta un tammig red e vuhez. Leuniet mat eo bet ivez gant al labour tenn e bed an deskadurezh hag ar

ouiziegezh lennegel. Setu e labourioù pennañ : embannidigezh e dezenn war "Gwaith Dafydd ap Gwilym" (labour Dafydd ap Gwilym, barzh brasañ Kembre 1340-1370). Etre e dezennoù e kavaz amzer da embann skridoù, notennoù, skridoù-verur niverus er c'helaouennoù. Daou levr ivez, deud da vezañ "klasel" abaoe, *Baledi'r Ddeunawfed Ganryf* (Gwerzioù an XVIIvet kantved) e 1935 ha *Hanes Llenyddiaeth Cymraeg hyd 1900* (Istor al Lennegezh Kembraek betek 1900) e 1944. Dav menegiñ daou levraoueg all, an *Oxford Book of Welsh Verse* e 1961 ha *Llyfrdydiaeth Llenyddiaeth Gymraeg* (Levr Oxford ar varzhoniezh kembraek ha Levriennadurezh Lennegezh Kembraek) e 1976.

Daout m'en deus skrivet barzhoniezh a dalvoudegezh e-unan eo dreist-holl evel skridarmer meur, kelenner gouziek-meurbet ha barnier Eisteddfod didro ma vo dal'het soñj anezhañ. N'eur ket evit muzuliañ amañ e Breizh pouez seurt tud, sammet ganto ar bec'h da zwiall live lennegel ar c'henvroderigoù barzhoniezh savet evit an Eisteddfod da skouer. Degaset en deus kalz Thomas Parry d'e vro eta dere e varnidgezh, e gelaouadurezh hag e outiziegezh.


HARRI GWYNN


Un oristal a zen e oa Harri Gwynn p'e gefvierier gant ar re emaeomp o paouez menegiñ. Goude bezañ graet berzh en e studidù istor e Londrez e teuas en-dro da Gembre da zerc'hel douar e Rhoslan. Bep sizhun e kente en e vannskrid eus "Y Cymro" e vuhez a labourer-douar, gant kalz a fent hag a zizouiñs allies. Anv e heuliad pennañ a oa "Rhwng Godro a Gwely" (Etre ar goro hag ar gwele). En ur vannskrid all eus "Y Cymro" e roe ur varnidgezh a-zaore war al levrioù nevez. Div levrenn a varzhoniezh en deus embannet "Barddoniaeth Harri


Gwynn" hag "Yng Nghedwigoedd y Sêr" (Barzhoniezh H.G. hag E Gwezegi ar Stered). Digoret en deus an hent d'ar skinwel a-vremañ e kembraeg, un abostol araokour eus ar skinwel hag ar skingomz eo bet ha gouezet en deus degas talvoudegezh en abadennoù kembraek ar stlennañ nevez-se.



PADRIG AN HABASK







Ar monument en enor da Dolly Pentreath

soñjer e oa aet ar Gonideg da Benzance — nepell diouzh ti Dolly Pentreath — e 1793 ha n'en deus bet netra da lâret diwar-benn roudoù ar yezh. Er c'hontrol La Tour d'Auvergne a oa bet prizonial e Dodmin e 1795 a skrivas kement-mañ : "La langue gauloise qui était aussi il y a quelques années la langue vulgaire des peuples du pays de Cornwall en Angleterre se trouve aujourd'hui entièrement éteinte dans cette contrée".

Tud zo a oz gouest da skrivañ ar yezh goude marv Dolly koulskoude. Un den anvet Thomson, eus Truro, en deus savet ur barzhoneg diwar he fenn :

Coth Doll Pentreath cans ha deau
Marrow ha kledhys ed Paul pieu
Na ed en eglos gans pobal bras
Bes ed eglos hav coth Dolly es.

D. Pentreath kozh kant bloaz ha daou
Marv hag interet e parrez Paul
N'emañ ket en iliz gant an dud vras
Met er vered emañ Dolly gozh


Daines Barrington, an istorour ezel eus ar "Society of Antiquities", an hini eo en doa kavet Dolly, a resevas ul lizher digant ur pesketaer eus

Mousehole, William Bodener, na oa nemet 35 bloaz, hag emañ da lâret en doa desket ar yezh war vor gant ar besketarienn hag e oa pevar pe bemp den en e gériadenn a oa gouest da gaozeal ar yezh c'hoazh.

D'ar mare-se e veze c'hoazh ur bern pesketaerien eus Breizh o vont da besketa war aodoù Kernev-Veur ha tu zo da grediñ e veze an darempredoù ganto e brezhoneg.

Ar pezh a chome goude mary Dolly Pentreath ne oa nemet roudoù eus ur yezh war, war he zremvenn. E-pad an naontekvet kantved e oa c'hoazh tud a ouie kontañ pe a ouie un nebeud gerioù, pe ar Pater, hag un toulladig tud desket a ouie skrivañ, an hini brudetañ a oa Davey eus Zennor hag a zo marvet e 1891 — muioc'h eget ur c'hantved war-lec'h Dolly Pentreath ; desket en doa-eñ kaozeal ha skrivañ. N'ouzer ket hag-eñ e ouie mat pe get ha digant piv en doa desket. Bez' e c'heller lâret nauze, n'eo bet marv ar yezh morse, rak kerkent ha marv ar gerneveuregier zwezhañ e oa krog tud all da studiañ ha da brederiañ war ar yezh. Tud eus an diazev e oant er penn kentañ.

Unan eus ar re a oa dedennet gant ar yezh oa ar Priñs Louis Lucien Bonaparte aet da Gerne-Veur e 1860. Savet en doa ur maen-ehvor e koun Dolly. Un nebeud yezhourien, Lach Szymra da skouer, a grogas da studiañ ha da zastum roudoù ar yezh. Ur geriadur a oa bet embannet gant Jago e 1881.



Menez Mikael ar Mor Kernev-Veur

Ne c'heller ket ober ur gwir emsav eus ar getomaned-mañ. N'eus tu kaozeal eus an emsav nemet adalek penn kentañ ar c'hantved-mañ.

An emsav e Kernev-Veur a oa da gentañ un emsav romantel, heñvel ouzh ar pezh a c'hoarveze er broioù keltiek all. En ur lenn barzhonegoù kentañ T. Gwyn Jones e Bro-Gembre e c'heller santout ar spered romantel-se. Krouet e oa bet ar gador Galtiek en Oxford gant Mathew Arnold (a oa hanter gernevat) e 1877 ; ha broudet e oa bet an dud da soñjal en amzer dre-menet gant hiraezh, da zastum ar mojennoù kozh, da skrivañ barzhonegoù diwar-benn Arzhur hag enez Avalon kentoc'h eget prederiañ war an amzer da zont.

E-pad un tregont vloaz bennak eo chomet bev ar spered-se — matre e oa deskiñ ar yezh, lenn ha skrivañ anezhi, mont d'an ofrenn gerneveurek div wech ar bloaz ha bezañ gouest da lâret un nebeud frazennoù, met ne c'hell ket ur yezh bevañ ma ne vez ket implijet bemdez hag e forzh peseurt degouezh.

E-pad hanterenn gentañ ar c'hantved-mañ, koulskoude, e oa bet graet ul labour souezhus gant un dornad tud evit adsevel ar yezh. Tad ar c'herneveureg, evel ma ouzit sur a-walc'h, a oa Henry Jenner, un den a labour e Mirdi Broadel Breizh-Veur hag a die-mene e holl amzer o klask ar skridoù kozh, studiañ hag embann anezho. Er penn kentañ e studie ar yezh evel ur yezh varv, evel ma studie latin da

skouer. N'en doa ket c'hoant da adsevel ar yezh evel gwir yezh ar vro. Met e-kerz ar bloavezhioù en deus ch'fichet menoz.

E 1901 e krog an emsav da vat, setu savet *An Cowethas Kelta-Kernuak*, ur gevredigezh a glasse skoulmañ darempredoù etre Kernev-Veur hag ar broioù keltiek all. Stad yezh Kernev-Veur a zo bet ken gwan a-viskoazh ken eo bet sikour ha skouerioù er broioù all. E bal pennañ a oa sevel ur *Gorsez* evel e Breizh hag e Kembre. Degemeret e oa bet evel barzh Gorsez Breizh. Dibabet gantañ an anv Gwas Myghal, ha pedet e oa bet da Gondaloh an U.R.B. e 1903 e Lesneven. Eno en doa kaozeet kerneveureg hag e oa bet komprenet, sañset. Setu ar wech kentañ m'eo bet komzet ar yezh abaoe he "mary" ! Ar pep souezhusañ eo n'eo ket e Kernev-Veur eo bet adaozet ar yezh met e Breizh — e Kernev-Veur evel just ne vije bet den evit kompren !

An den-mañ en deus graet pep tra e-unan evit klask adsevel ar yezh. Klasket en doa sikour digant ar broioù all met ne oant ket bapred ar re-mañ prest d'en ober. E 1904 en doa klasket lakaat ar *C'hendalc'h Keltiek* da zegemer Kernev-Veur. Tud zo — Kelted — ne oant ket a-du, ne gawe ket dezho e oa chomet Kernev-Veur ur vro galtiek met votet e oa bet a-du abenn ar fin ha degemeret e oa bet. An degouezh-mañ a zo bet pouezus- tre peogwir ne oa nemet dre sikour ar Galted all e vafe an emsav war-raok. Ma ne vije ket bet degemeret Kernev-Veur gant ar Galted, ne vije ket bet degemeret biken gant tud all. Kaset e oa bet ur pellskrid da Jenner e kerneveureg gant Hamley-Rowe da gas gouic'hemennoù dezhañ evit bezañ bet degemeret.

Neuze e krogas tud all da vezañ dedennet gant ar yezh ha Jenner a embannas ul levr kelenn e 1904 *Handbook of the Cornish Language*. E-touez ar re dedennet gant ar yezh e oa William Watson hag en doa krogset da zeskñ ar yezh e-unan diwar ar skridoù kozh, Morton Nance hag an Doktor C.A.P. Picquenard, ur barzh eus Breizh, ar Barzh Melen a oa e anv pluen, Kregiñ a rae ar re-mañ da skrivañ e kerneveureg.

Morton Nance an hini eo en doa sikouret Jenner ar muiañ da adsevel ar yezh, Asambles gant Jenner en doa savet an *Cowethas Kernow Goth* e 1920 evit studiañ ha dastum ar pezh a chome eus ar sevenadur hag an istor hag e 1925 e voe gwelet huñve Jenner



Henry Jenner (1848-1934)
Tad ar c'herneveureg a-vremañ

o dont da wir : savet e voe *Gorsez Kernev-Veur* gant Jenner evel *Ar c'h-drouiz*. Nance en doa savet ur goul keltiek ivez hag e oa bet pedet tud eus an holl vroioù keltiek.

Jenner ha Nance o doa bet kalzik darempredoù gant Breizh (muioc'h eget gant Kembre a gav din). Deuet e oant d'ar *Gorsez* alies a-walc'h hag an daou-se o doa desket an tamm brezhoneg — e gwirionez, kalzik eus ar re a zesk kerneveureg a ya da zeskñ ur yezh keltiek all, ar pezh a sikour anezho da gaozeal kerneveureg. Kavet 'm eus lizhiri etre Nance ha J. Cuillandre, ur c'helenner eus Roazon. Skrivañ a ra : "et dans deux mois je voudrais préparer une édition revue et amendée de pascon (Passyon Agan Arluth — ur barzhoneg hir eus ar pemzekvet kantved) avec un vocabulaire qui en permette l'étude aux Bretons, mes compatriotes". Klav e oa bet ha n'eo ket deuet a-benn war a

seblant da embann ar barzhoneg-mañ. Koumanantet e oa un nebeud *Kerneveuriz d'An Oaled* ha da *Gwalarn*, *Darempredoù* o doa dreist-holl gant Loth, Taldri, Dr Picquemard, Cuillandre ha Roparz Hemon, ha gant an Dr Cottonec ivez evit sevel ur goul gouren etrekeltiek.

An dud a grede dezho e oa dav unvanij ar skritur hag ar yezhadur evit ma vije tonket ar yezh da vezañ da vat. Morton Nance en doa labourer war ar yezh hag e 1929 en doa embannet e levr kelenn *Cornish for all*. Roparz Hemon en doa studiet un tamm kerneveureg pa oa e Leeds, ha skrivet en doa e 1923 : "a-raok klask adsevel ar c'herneveureg e vafe mat marteze lakaat urzh er yezhadur, er geriadur ha dreist-holl er skritur". Skrivet en doa da Nance goude ma voe bet embannet e yezhadur : "now I see that at last a man has come to do the work — and has done



Morton Nance (1873-1959)

it properly in a scientific and practical way."

Ur c'hammed pouezus eo bet unvan-
niñ ar yezh evit ma vefe aesoc'h d'an
dud deskiñ anezhi, met Nance daoust
da veuleidiou Roparz Hemon ne oa
ket ur yezhonour hag ur bern faziou
en doa graet. Ne vez ket sikourat da
zistagañ mat gant doare-skrivañ ar
yezh unvanet. Diazezet eo ar yezh
unvan war ar c'herneveureg-krenn ha
n'eo ket war yezh toc'h ar triwech-
vet kantved. Da heul skouer hollrudet
ar Vretoned ez eus tud zo hiziv an deiz
o klask cheñch an doare-skrivañ hag o
vezont ket degemeret mat-tre gant tud
an emsav kozh, dav eo lavaret.

Jenner, Nance hag un nebeud re all,
Caradar en o zouez, o doa strivet kalz
da adsevel ar yezh koulskoude, ha da
vroudañ tud all da zeskñ anezhi met
chomet e oa un emsav evit ar vour-
c'hizien hag an dud desket. Ur seurt
c'hoari spered a oa evito, daoust d'o
c'halon bezañ tomm ouzh ar yezh. Ar
bobl ne gaoze ket ar yezh, nemet ar
re o doa amzer hag arc'hant da studiañ
ha beajiñ.

Nance en doa lâret a-raok e varv e
1958 : "One generation has set Corn-
ish on its feet. It's up to the next to
make it walk" (ur rummad tud en deus
lakaet ar c'herneveureg war-sav, d'ar
rummad da zont eo da lakaat anezhi
da vale). Diazezet e oa ar yezh, met
pell e oa da vezañ ur gwir yezh evit

Ar Gorsez e veze dalc'het ur wech ar
bloaz hag an ofrenn e veze lidet div
wech ar bloaz. An dud ne c'hellent ket
kaozeal etrezo a-hend-all. Skrivañ
lizhiri ya, met tu ebet da gaozeal.

E penn kentañ ar bloavezhioù han-
ter-kant e krogas an traoù da cheñch.
Muioc'h a dud a voe dedennet gant ar
yezh ha kregiñ, a rejont da implijout
anezhi aliosoc'h. Savet e oa bet ur
kozh, krog e oa un nebeudig lazou-
oc'h a dud yaouank a oa dedennet
labour c'hoazh en emsav met ne oa
ket gouest-tre an dud-se da ober im-
plij eus ar yezh. Desket e veze evel ma
veze desket galleg d'ar c'houlz-se hag
an dud a oa barrek da skrivañ met ne
c'hellent ket kaozeal. Dav e oa gortoz
ar rummad tud da zont evit ma vefe
kaozeet ar yezh da vat.

Ar rummad tud-se en doa savet ur
gevredigezh evit ar yezh koulskoude,
Kesva an Tavas Kernewek (Kuzul ar
Yezh Kernevek). Levrioù a vez embann-
net ha kroget eur da dreñ ar Bibi ;
savet e vez ivez arnodennoù er yezh
evit bezañ degemeret er Gorsez.

Cheñchet eo bet da vat an traoù
pemzek vloaz zo. Embannet e oa bet
ul levr nevez d'ober skol, *Kernewek
Bew* gant Richard Gendall. Hiziv ne
vefa ket lâret ez eo ul levr dispar met
pemzek vloaz zo e oa nevez-flamm.



Gorsez Kernev-Veur

Kroget en doa Richard Gendall d'ober
kentelioù er skol e-lec'h ma labour.
Me 'm eus bet ar c'hañs da vezañ er
skol-se ha gelllet em eus heuliañ e
gentelioù. Setu ar wech kentañ e oa
d'ar yezh bezañ kelennet en ur skol
Stad. Anat e oa e oa ret d'ar yezh
bezañ kenteliet d'ar re yaouank, evit
da c'hellout bevañ. Kelennet e voe
ar yezh e div skol all da heul hag un
toulad kentelioù noz a oa bet savet
ivez met ne oa ket tu d'ar re a zeske
ar yezh d'en em vodañ. Pep hini a
zeske en e gornig ha setu holl.
Neuze me 'm eus bet ar menoz da
sevel un devezh studi e-barzh ma skol
ha pediñ an holl re a oa o teskiñ ar
yezh ha dreist-holl ar re yaouank.
Berzh en doa graet an devezh-se hag
abaoe ez eus bet graet devezhioù all
ha dibennoù-sizhun ivez. Pouezus-tre
eo d'ar re a zo o teskiñ, kaozeal etreze
evit gweallaat ha krefivaat o yezh.

Aet e oa kuit kalz a dud yaouank
eus Kernev-Veur d'ober o studioù (o
vezañ n'eus skol-veur ebet e Kernev-
Veur), un nebeud anezho da Vro-
Gembre, hag en ur zistreiñ o doa
kroget pe gendalc'het da zeskñ ar
yezh, kalonekaet gant ar pezh o doa
gwelet er broioù all ha dreist-holl
stourm ar yezh e Bro-Gembre. Abaoe
dek vloaz kalz a dud nevez a zo deuet
d'an emsav, tud a bep seurt, met tud
yaouank dre vras, tud a zo gouest da
zeskiñ ur yezh hag implijout anezhi
ouzhpenn. Merc'hed zo deuet d'an

emsav koulz ha paotred. Gwechall e
veze renet an emsav gant paotred ha
bremañ e krog ar merc'hed da gemer
ur plas pouezusoc'h. Ar re yaouank a
labour evit ar yezh a va d'an C'hendal-
c'h Keltiek, da Gill Airne ha da
ouelou keltiek all met a-wechoù, dav
eo lâret, e vezont dipitet gant ar Gel-
ted all, dre ma ne roont ket kalz a
sikour dezhe.

Ar re yaouank o deus gwelet ne rae
ket ar c'hevredigezhioù kozh kalz a
dra evit lakaat ar yezh da vezañ. Savet
ez eus bet ur strollad, *Yeth an Werin*
(Yezh ar Werin), evit klask aozañ noz-
vezhioù ha devezhioù a-benn kaout
tud o kaozeal ar yezh — en ostalioù
en em vod an dud dreist-holl. Start-tre
e oa er penn kentañ, evel just, peogwir
ne oa ket gouest ar dud da lâret kalz a
dra, met lod a zo deuet a-benn da zesk-
kiñ kerneveureg nemet en ur vont d'an
nozvezhioù-se. Bremañ ez eus evar pe
bemp strollad o'n em vodiñ ingal, unan
anezho a en em vod bep sizhun abaoe
pemp bloaz.

Da heul ar c'hammed-mañ eo bet
savet *Cowethas an Yeth* (Kevredigezh
ar Yezh) e 1978. Ar re yaouank a
gompenas ne oa ket gouest ar re gozh
da reiñ buhez d'ar yezh ha divizet o
deus sevel ar gevredigezh nevez-mañ
evit sevel stajoù, embann ur gazetenn
vizek *An Gannas* (ar C'hannad) ha
kentelioù-noz. Labourat en deus
vizek kentoc'h eget kaozeal diwar he
fenn. N'eus ket bet livet kalz panelloù
c'hoazh met marteze e teuo l Savet
'z eus bet panelloù divyezhek Corn-
wall/Kernow koulskoude war an har-
zou e Bro-Saoz ha Kernev-Veur,
gant ar c'huzul ramvro abalamour
int bet paet gant ar Gorsez l.

Ur gazetenn c'hoapaus ha flemmas,
Eythen (Al Lann) a oa bet embannet
e-pad ur mare, ar pezh a ziskoueze e
oa gouest ar yezh d'ober goap eus
n'eus forzh petra. Savet 'z eus bet ivez
ur strollad evit krouiñ gerioù nevez
evit ma c'hellfe ar yezh bezañ ur
benveg evit ar vuhez a-vremañ. Betek-
henn ez eus bet savet gerioù evit an ti,
ar gegin, an hent hag evit ar burevioù.
Alies e vez gouletmet ganin pet a dud
a gomz kerneveureg. Dias-tre eo lâret,
Un 200 bennak a zo gouest da gaozeal
mat ha da implijout ar yezh bemdez.
Ar re-mañ a zo dreist-holl tud yaouank
ha n'emañ ket holl o vevañ e Kernev-
Veur. Ur mil den bennak a oar un
tamm pe a zo o teskiñ met n'eo ket
a-walc'h evel just. Da heul an emsav-
mañ, renet gant ar re yaouank (dindan
40 vloaz), gant ar pouez war ar yezh
kaozeet eo krog un nebeud familhoù



ar c'herneveureg war ar stalloù (amañ ur stal legumaj, frouezh ha bleuniou)

da sevel o bugale e kerneveureg.
Kudennoù zo bet gant ar familhoù
kalonek-mañ. N'eo ket aes sevel bugale
e kerneveureg pa vez kavet ur yezh all
kalz krefivoc'h en-dro. An dud-mañ a
rank labourat en o c'horn o-unan, hep
kalz a sikour. Familhoù zo o deus kro-
get da sevel o bugale e kerneveureg ha
ne ouient ket mat a-walc'h ar yezh ha
chomet int asav, met un nebeud re o
deus kendalc'het koulskoude. Ar c'her-
neveureger a-wihanik koshañ a zo bre-
mañ seizh vloaz ha divyezhek eo pen-
da-benn. Ur gevredigezh (*Dalleth*) a zo
bet savet da sevel skolioù-mamm ha
levrioù evit ar vugale met n'int ket aet
gwall bell evit c'hoazh.

Er skolioù Stad e ya an traoù war

wellaat ivez. En un nebeud skolioù
kentañ derez e vez desket ar yezh un
tamm met pep tra zo stag ouzh youl ar
rener. Er skolioù eil derez e c'hell ar
vugale dibab deskiñ kerneveureg goude
ar skol pe da greisteiz, ma'z eus unan
eus o c'helennerien barrek d'ober skol.
Un arnodenn-Stad — C.S.E. (Certi-
ficate of Secondary Education) — zo
bet savet met n'eus ket kalz a vugale o
tremen anezhi evit c'hoazh. Ur gen-
strivadeg pezhioù-c'hoari kerneveurek
evit bugale a zo bet savet gant ar
C'hendalc'h Keltiek. Evit ar re war an
oad ez eus stajoù a bep seurt e-lec'h
ma vez klasket ober pep tra e kerne-
veureg. Savet 'z eus bet ivez ur skol
dre lizher daou vloaz zo ha tu zo da



zeskiñ kerneveureg dre ar galleg bremañ. Ha burzhudusat tra marteze, un abadenn dele evit kelenn ar yezh a zo bet skignet ar bloaz paseet ! Mat-tre e oa ha gwerzhet eo bet da Sianel Pedwar Cymru ha lakaet eo bet e kembraeg ! Brudet e oa bet ar romant kentañ a zo bet savet er yezh pa'z eo bet dibabet gant "The Times", ar skrivagner Melville Bennetto, evit an den en doa an nebeutañ a c'hoant da c'honit arc'hant e-pad ar bloaz tremenet ! Ur yezhadur bras a zo bet embannet e 1984 ivez.

Abaoe penn kentañ e Kernev-Veur ur skouer eus an doare ma vez adsavet ur yezh. D'am soñj n'eus nemet div yezh er bed a zo bet adsavet er c'hantved-mañ — an hebraeg hag ar c'herneveureg (hag ar c'herneveureg hep sikour ur Stad !). Da gentañ un nebeud tud desket a zastum ar skridoù kozh, a sav ur geriadur hag ur yezhadur. Dont a ra un nebeud re all da zeskiñ lenn ha skrivañ ha da sevel kevredigezhioù evit sikour ar yezh hag er fin eo deuet ar re yaouank, gouest da gaozeal ar yezh ha da gaozeal anezhi bemdez gant o bugale. Klasket e vez bremañ ober implij eus ar yezh e kement digarez zo. Ar bloaz tremenet er C'hendalc'h Keltiek e Corcaigh ne oa nemet ur vro na rae ket he frezegen e saozneg (yezh etrevroadel ar broioù keltiek, evel ma ouzit) ha Kernev-Veur an hini oa.

Troet eo da vat spi Morton Nance pa lare, e 1958, e oa d'ar rummad tud-mañ da lakaat ar yezh da vale. Dav eo deomp lakaat anezhi da c'h'aloupat bremañ gant ar vugale. Ne vo yezh kentañ ar vro biken met tu zo da gaout spu e teulo da gemer ur plas pouezusoc'h e buhez ar vro.


(Savet eo bet ar pennad-mañ diwar ur brezegenn graet en Ensavadur ar Studiù Keltiek — Skol-Veur Breizh-Uhel)

MORWENNA JENKINS ■

Chomlec'hioù

Kevsa an **Texas Kernewek** : W. Brown, Chy an Gell, 9 Prith Road, ESSA (Salrasi).
Cowethas an Yeth Kernewek : B. Webb, 29 Midway Brive, Uplands Park, TRURO.
Dalleth, 9 Ansell, 65 Chruchoctown, Gwincar, Hayle.
An Gannas (mistic'h) 29 Midway Brive, Uplands Park, TRURO.
An Leif Kernewek (trimitiek) E.G.R. Hooper, 93 Mt Pleasant Road, CAMBRON (Cambrone).

BROIOÙ



1

An Himalaya

LADAKH

Ladakh : anv tennet eus ar ger tibetan *La - dwags*, d.l.e. bro an odeoù — anvet ivez Tibet vihan, a zo enasket e-kreiz an Himalaya. Bevennet eo gant Pakistan, Sina, Tibet, India hag Afghanistan. Abaoe m'he deus Sina perc'hennet an Aksai-chin hag ar Chang-thang ha Pakistan ar Baktistan eo bet strishaet gorr al Ladakh da 67.710 km². Niver an annezidi a zo war-dro 125.000. Niver bihan-tre p'e geñverier gant gorre ar vro met a c'heller meizañ pa soñjer e garventez al lec'h adurezh hag an temz-amzer o ren. Rannet eo al Ladakh etre pemp lod.

Nubra, rannvro goloet gant ar menez Karkorum, a zo amzere ouzh ar vuhez al lodenn vrasañ anezhi. N'eus nemet a-hed ar steroù Nubra ha Shyok ma'z eus douar mat da labourat, daou eost a vez graet eno bep hañv. Koadegoù bras a eñl a vez kavet e Nubra, ar pezh a zo

un teñzor en ur vro e-lec'h n'eus gwenn ebet. Gwez-avaloù ha gwez-abrikez a zo e-leizh ivez.

Ladakh-kreiz e-lec'h m'emañ ar gêrbenn Leh, lec'hiet da 3.500 m a uhelder, 4.500 a dud enni. Ar rannvro arnevesañ eo, dreist-holl en abeg d'an aheñ Srinagar-Leh.

Chang-thang ha Rupshu zo al lec'hioù uhelañ ha yenañ. N'eus o chom eno nemet kanteourien a vez diouzh magerezh loened ; givri, defived ha yaked a dreuspeur e-pad an hañv. Gwechall war an hent meur etre Sina hag India e oa Chang-thang ha Rupshu lec'hioù kenwerzhel a eskemm bras etre ar gantreourien hag ar veajourien ; bremañ avat gant ul lodenn vras eus ar vro aloubet gant ar Sinaiz, int deut da vezañ gouelec'hioù pe dost.


Zanskar (anv ar rannvro, kouveur gwenn) a zo un douar yen hag uhel

goloet gant erc'h e-pad al lodenn vrasañ eus ar bloaz. Ladakh ha Zanskar, rouantelezhioù dieub gwechall a ya bremañ d'ober ul lodenn eus India ha staget int bet ouzh rannvro indian Zammu Koshmis. Koulskoude ez eus c'hoazh ur rouanez e Ladakh hag ur roue e Zanskar. Poblñs ar vro a zo a orin tibetan hag a relijion voudaek, daoust ma vez kavet Islamiz dreist-holl e Kargil. Estregt Leh ez eus div gêrig all, Kargil ha Mulbeck. E Zanskar ur gêrig vihan-tre hepken, Zangla, kêrbenn ar rannvro. Mod-all ne vez kavet nemet bourc'hioù ha manatioù. →

LADAKH

Mibien prizius.
 C'hwiz zo ma brasañ lonc'h gwir deñzor ma zi.
 Daoust deoc'h bezañ ganet diouzh [kerent dishañvel,
 breudeur oc'h koulskoude,
 ken prizius ha viou aour
 ar yar-beur'hlan.
 C'hwiz zo mibien galonek
 ar vuoc'h doñv hag ar yar ouez.
 E-pad an tri miz hañv
 ez eot dishual hag edrus
 dre ar menezioù erc'hiek
 da zebrif ar bleuñv alaouret ;
 Hag e-pad an goañv hir ha yen
 e waskedin ac'hanoc'h.
 Reiñ a rin deoc'h
 ar c'holo kaer melen,
 ganto c'hwiz frondus ar peurvanoù.

(kan arat eus Ladakh)



BROIOÙ AN HIMALAYA

BHOUTAN

Anv gwirion Bhoutan a zo "Druk-yul" (d.l.e. Bro an Aeroant). An aeroant oc'h aroueziañ an taran. An anv Bhoutan a zeu eus ar ger sanskriteg Bhotanta (marzhoù an Dibetaniz) — ur rouantelezh dieub eo Bhoutan ha bevañ a ra diwarni hec'h-unan. War-dro ur milion a annezidi o chom enni, strewet war ur gorread a 47.000 km². Kêrbenn ar vro eo Thimbu gant 4.000 a dud. Rannet eo ar vro etre eizh rannvro, pep a greñvlec'h enno gant ur renerzh relijiel ha lik.

Temz-amzer Bhoutan a ya eus ar pep yenañ war an uhel betek ar pep tomañ en traoniennoù e-lec'h ma vez kavet ur c'hlaizentez fonnus : koadoù bras a vez pin, kraoñnegoù, dervenegoù. D'an nevez-hañv e vez goloet an torgennoù gant brug roz. Ar c'houlzoù amzer a vez merket mat ha temzoù-igoù-amzer espar a zo ivez. Bananezened ha friezened zoken a vez kavet. An dud a zo a orin tibetan ha tremen a reont evit bezañ ur ouenn start ha kalet. O arz a zo kaer-tre ; an disavourien hag ar gilvizien n'o deus ket o far. Ar roue a zo o ren hiziv n'en deus ket tregont vloaz, Singyé Wangchuk eo e anv.

NEPAL

12 milion a annezidi. Kêrbenn, Kathmandu. Ur rouantelezh indian e oa gwechall, met an dud a orin Newar o deus ur sevenadur dezho o-unan daoust d'al levezonoù a bep seurt. Anavezet mat eo Nepal evit bezañ ur repu d'an dud yaouank eus ar c'hornôg troc'het diouzh o sevenadur-int hag ivez evit ar ouenn anvet Sherpa, anezhi Tibetaniz divroadet, abaoe m'emañ Tibet dindan yev ar Sinaiz. Int eo ar re nemeto o deus harpet ar gornôgiz da drec'hiñ an uhelderiou evel menez Everest. War-lerc'h kêr gKathmandu ez eus ur gêriadennig all anavezet mat a-walc'h evit bezañ al lec'h ma vez gopret ar Sherpaiz, Namtche Bazar hec'h anv.


SIKKIM

Anv gwirion Denjong (Bro ar riz). Kêrbenn Gangtok gant 6.800 den. Gorread ar vro 7.107 km² gant 204.800 a annezidi. N'eo ket Sikkim ur rouantelezh ken, aloubet eo bet gant India e 1975. Ar boblañs a ra hec'h

annez etre 1.600 ha 3.500 m a uhelder. An uhelennoù a dizh 8.000 m. Ar c'hoadoù a c'holo war-dro an drederenn eus ar vro. Levezon Tibet a zo bras. Ar gredenn a zo ar voundagezh. Tud Sikkim a zo a orin Newar (eus Nepal) nemet re Lepcha ha Bhotia hag a zo a orin tibetan.

MUSTANG

Anv Mustang a zeu eus Smon-Thang e tibetaneg (kompezenn ar pedemnoù). Kêrbenn Mustang a zo Glo-Sman-Thang gant 1.500 a dud o chom enni. Gorread ar vro a zo 3.800 km², niver an annezidi 12.000. Ur rouantelezh dieub eo. Evit gwir ne ra ket glav war ar vro-se ha dre-se n'eo ar vro nemet ur bradenn vanek sec'h. Ne vez kavet er vro nemet bourc'hoùigoù ha manatioù. Ne vez kavet gwezenn ebet hag ar c'hriagnerzh a ra e labour.



24




3



4



6



7



8

25

TIBET

Ne vo ket komzet eus Bro-Dibet pe gwir ez eus bet ur pennad diwar he fenn n'eus ket pell. Ne vo roet nemet un alberz diouti dre istor buhez un Tibetan eus rannvro Kham en deus stourmet a-enep ar Sinaiz ha treuzet ar vro war droad betek Ladakh.

"Ma enorioù kentañ a zo re ur paotrig o redek dre ar pradeier glas a gell'he Dunkung ma c'hriadenig. Pe zeue an hañv e veze goloet ar pradeier gant ur pallenn a bour-bran, bokedoù-laezh, beverezoù an Alpoù, bleunioù-hañv ha kalz bleunioù gouez all... a rae evel ur marelladur lintrus.



JONATHAN

Gant ar pennad-mañ ez echu an Iteuliad gouestlet, abaoe niverenn 31 hor c'helaouenn, da vroioù ha da annezidi an Himalaya.

Degas a ran da soñj hol lennerien dedennet gant ar c'horn-se eus ar bed e vez embannet, gant *Keit Vimp Beo*, ur rummad levrioù barnoù-treset a dremen eno : *Jonathan*, gant Cozey.

Tu 'vefe moarvat da damall troidigezh embannerien Vrieg, e-keñver ar yezh *kornbrol* pe al lizherennaouiñ. Ur pec'hed e vefe avat chom hep lenn al levrioù-se.

Un Helvet eo Cozey, — evel Derib —, ha n'eo ket kiriek eus stioù hor sevnadur. Kiriek eo kentoc'h eus e zoare da zereveillañ dre ar skeudenoù, Barrek-kenañ eo war an dachenn-se, evel Derib, ha kaer-kaer eo e labour.

35 lur e kousto pep levrenn, bez' e c'heller o frenañ digant Keit Vimp Beo, Oaled ar Re Yaouank 29112 Brieg.

AR MAKETENNOUR ■

Ni, bugale, a denne hon botoù ha mont a raemp da redek e-mesk ar bleunioù o santout ar freskter hag ar vuhez dindan hon treid noazh. En em astenn a raemp evit santout c'hwezh kreñv ha douz ar bleunioù, ha selout a raemp ouzh ar c'houlmoulennoù o vont gant red an avel dre an oabl turkvaen, ganto furmoù a bep seurt.

D'an abardaez e tegasemp al loened d'ar gériadenig. En em fichat a raemp, ni hag al loened, gant garlan-tezioù bleunioù gouez hag un ambrougadenn livet-flamm ha drant a gemere penn an hent war-du ar gêr.

Bremañ on deut da vezañ un den kozh ha gant an oad soñj ma n'erzh diouzhin. An tonkadur kalet en deus distrujet kement tra am eus karst. Pa soñjan em hloavezhioù kentañ e welan anezho dirazoñ, ken bev ha ken sklaer ha dourreñnoù strinkus ma bro, Nyarong. Ur vro gaer e oa hag ar vuhez enni, daoust dezhi da vezañ izel ha kalet, a oa leun a eurvad hag a levez. Ha neuze int deut... da gentañ gant komzoù flour ha gant arc'hant lugernus, goude gant fuzuilhoù ar marv. Kemeret o deus ma farkeier, ma loened ha ma zi. Preizhet, divinniget, distrujet ha tangwaltet o deus ar manatioù hag an azeulioù e-lec'h ma veze boazet da vont da bediñ ; evel lastez o deus lazhet ma mignonned, ma ziegezh, al lamaed hag an holl dud a garen... war ur goueziezh skornet goloet gant un erc'h dister ha skubet gant an avel yen em eus laosket a-dreñv din korfoù marv difurm ha toulet gant bolledoù ma merc'hig nemeti.

Ret e oa din mont da vezañ er menezioù uhel, evel ul leon gouez hag ul laer e ranken kuzhat diouzh an deiz ha mont diouzh an noz. Ne zeue betek ennon nemet naon, sec'hed, gwanidigezh ha poan. Bolledoù o deus roget ha treuzet ma c'hroc'hen ha ma c'higennoù. Ar gloazioù a oa deut da vreiñ hag ar breinadur en doa krignet ma c'hig ken e oa deut ma hollved da vezañ ul latarenn a loes vouzar, enni flaer ha brein, Krign. Ar boan, an droug, ar marv... Kement-se-holl a zo kouezhet war ma buhez hag ivez war buhez ma c'henvroiz a weschall hag a

vremañ, war ar re a zo chomet e Tibet. Bevañ a reont noz-deiz gant an doan en ur vro deut da vezañ un toull-bac'h divent. Pep tra a zo lamet diouto : o feiz, o enor, o stad-den hag o frankiz neñt, marteze ar frankiz da gaut naon, da vezañ sklav ha da vervel.

Ya, pep tra zo em memor. Ar gloaz hag ar c'hwerlder o deus engravet em sperep pep mareig ha pep degouezh. Ya, pep tra zo ken bev ha gwir ha perlezennoù lintrus ar rozera a zisoñj bremañ ma daouarn kozh.

Pediñ a ran evit ma bugelig, ma gwraez ha ma mignonned a zo marv hag ivez evit kement hini a chom c'hoazh em faour-kaezh bro. Pediñ a ran evit ma paouezo da c'houzañv an Dibetaniz hag evit ma adkavo Tibet he frankiz."

T.B. ■

skudennoù :

1. Mustang.
2. Ladakh.
3. Ladakh.
4. Bhoutan.
5. Sikkim.
7. Menezioù Zenskar.
8. Bugel eus Bhoutan.
9. Nepal.
10. Gangtok, kêrbenn Sikkim.
11. Plac'hig eus ar Sikkim.
12. Ladakh.



9



10



11



12

SEIZH AVEL
OSTALERI
ABADENNOÙ
(96) 35.80.64
KONFORT-BERCHED (Bro-Dreger)

BREIZH

ERWAN

An deiziou o tishilian
hini ha hini
warnomp.
Ha daoust da strivou an amzer
Evit krignat ar c'houn
Ned ez ket digancomp.
Hogen pelec'h
Pegoulz ar poent
Ma 'z adkroazio hon hent ?

Digor e chom ar goul
Evel an toull
Az lonke
Hag a lonke
Un tamm ac'hanon-me
An devezh-hont a viz Gouere.

MARTIAL

Mieleni minun teveki.
Aivoni ajattelevi
Lähteäni laulamahan,
Saa'ani sanelemahan.
Sukuvirttä suoltamahan.
Lajivirttä laulamahan ;
Sanat suussani sulavat.
Puheet puotelevat,
Kielleni kerkiävät,
Hampahilleni hajoovat.

AL LIAMM



MIRDI AR SILINIOU

Lidet eo bet, d'ar Gwener 21 a viz Even, digoradur ofisiel Mirdi ar Silinioù e Baz-Gwerrann. Tudi e karg ar vro a oa en em vodet en-dro d'an Ao, Olivier Guichard, Ministr, Rener Kuzul Broioù al Liger, rener Kuzul Liger-Atlantel, Kannad Bro-Werrann ha Maer ar Baol.

Hennezh ne oa nemet an digoradur ofisiel, a-gevret gant hini ar boestadoù gwestilli hag hini ar boutailhadoù hini mat. Digor eo ar stal abaoe ur bloavezh, e gwirionez. Resasoù zoken e vefe lavarout ez eo digor abaoe ur c'hantved, rak kavout a reer eno tra-zoù o tont eus ar mirdi kent, savet e 1887 gant an Dim. Adela Pichon. Unan eus ar c'hentañ mirdioù gouestlet d'ar sevenadur-pobl e vae neuze.

Savet eo bet ar mirdi nevez gant ar S.I.V.O.M., — e rener an Ao, Olivier Guichard, — ha fiziet eo bet ar renezh anezhañ en ur gevredigezh sevenadurel, *Gevred*, ha dreist-holl da unan eus hec'h izili, an Ao, Gweltaz Buron. Pledet en deus hermañ war ar sevel-pouezioù kent en em ouestlañ da sevenadur ar vro, setu perak ez eo ledanik e zivskoaz. Ledanoc'h c'hoazh eo e ouiziegezh : an den nemetañ eo amañ na lavaro ket deoc'h ez eo bet krouet ar silinioù gant ar Romaned, rak gouzout a ra ervat n'eus roudenn ebet eus labour an hollen er vro araok an dekvet kantved. Un den prizius enta.

Petra a gaver e Mirdi ar Silinioù ? — An holl draoù a denn da vuhet ar balu-

Gwened



derion ha d'ar sevenadur lec'hel. Binviij-labour, evel just, mes ivez maketennoù o tiskouez penaoe e ya ar silin en-dro. Dilhadou-Sul hengounel, gwisket gant delwennoù-koar kaer, bet savet diwar patrom Baziz, mes ivez dilhadou ar pemdez. An arberuri ruz brudet, mes ivez binviachoù boutin, n'int ket breizhek-rik, a veze kavet koulskoude e pep ti gwachall. Kavout a reer ivez, da skouer, mesgodennoù gwisketi e giz ar vro hag a veze gwerzhed hanter-kant vloaz zo d'an douaristid ; gwerzhed 'vez bolomigou-pej, — santonioù — graet gant un den a-vremañ.

Ur c'hoantik a vindi eo ouzhpenn hini ar Silinioù. Kinniget eo pep tra en un doare sklaer, ha skoazellet-mat eo an Ao, Rener, war ar poent-se, gant Mikaela, n'eus ket par dezhi evit kompenn un armel-ber.

Mes ar Mirdi n'eo ket un ti ez eo nemetken. Aozet e vez prezegennoù gantañ a-hed an hañv. Er bloaz tremenet, da skouer e tisplesg an Ao, Pêr Gouletker doareoù an hollen er registur. An deiz war-lerc'h ar brezegenn ul lodenn eus ar berzhidi, aet da ouez, a yeas e-keuz ar paludoù d'ober hollen mod-kozh-Noe. Adkavet o deus o skiant vat abaoe, evuruzamant. An hañvezh-mañ a vezo gouestlet, evel just, da abati Landevenneg, p'eo Baz unan eus he zrevioù (s.o. ar stern).

A-bouez bras eo kaout er vro tud sirius o plediñ gant ar sevenadur,

Uhelañ

PRIOLDI BAZ-GWERRANN

"Ha gwelet ! eus an diskouezadeg a-zivout Landevenneg, e Plougastell Daoulaz ?" a c'houlennas Gw. Buron ouzhin. "Dreist eo !" Diskouezadeg bro ar sivi, n'am eus ket gwelet. Hini bro an hollen, avat... Ha dreist eo houmañ ivez ? N'eo na divalav na dister d'an nebeutañ, ha labour kaer a zo bet kaset da benn gant skipailh Mirdi ar Silinioù, amañ e penn all ar vro vrezhoneger.

Prioldi Baz-Gwerrann a zo bet savet gant menezh Landevenneg, pa voe kaset kuit an Normanted eus ar vro. Tri zra a zo bet aozet evit lidañ pemzekvet kantved an Abati.

Er mirdi, da gentañ, ez eus bet dastumet tra-zoù, — delwennoù, levrioù, gwiskamantoù... — o tennañ d'ar vuhet relijiel e Breizh. War an daolenn vras e tisplesg, kichen-ha-kichen, istor Landevenneg, hini Breizh ha d'arvoudoù relijiel pennañ istor Bro-C'hall. Nepell diouzh an daolenn-mañ e kinniger d'an arvesterien un dastumadenn pezhioù-moneiz a ya eus re ar C'halianed betek re roueed ar C'hallaoued. N'hellan ket avat displegañ amañ pep teñzor na pep kavaden.


En ti-ker e vezo kavet un diskouezadeg all diwar-benn savadurioù relijiel parrez Baz, — a' oa staget outi, gwechall, ar Groazig hag ar Poulgwenn, Degas a ran ivez da soñj ar re a blij dezho an tiz e talvez ar boan ober un dro e kêrioùnoù ar baluderien... Gouizieien ivez a zeuzio d'ober prezegennoù evel an Ao, Ao. Gw. Bernier, Gw. Le Duc¹, Kel. Andrejewski, Gw. Buron, Kel. Fleuriot, an Tad Marc...

Gouizieien ivez a zeuzio d'ober prezegennoù evel an Ao, Ao. Gw. Bernier, Gw. Le Duc¹, Kel. Andrejewski, Gw. Buron, Kel. Fleuriot, an Tad Marc...


Itoueroù : Mirdi ar Silinioù 44740 Baz-Gwerrann (pg. 40,23,82,79)

¹ Gw. Le Duc ne vo ket evit dont. Arvet eo bet da galenner en un tu bennek e rae Bro-C'hall. Kement-se evit e skoazellañ en e labour keltieger.

PASKAL AR MARC'HEG



GERIOÙ-KROAZ "JOB"



- a-led :
1. Klask reoù saoz pe silioù.
 2. Mont dic'hour — verb brokus.
 3. Eus oumel — liester hini — evit kaout ti...
 4. Darnoù brezel.
 5. Hini ur roue, da skouer — penn leue
 6. Anv plac'h — eus Redones.
 7. O goulenn a reer da vezañ kelaouet.
 8. Perzh ul lec'h ne baker ket tomm enañ.

- a-zerc'h :
1. Ruz en hañv.
 2. Poan tud kozh — berr da Ouel Yann
 3. Ger-mell — brigen.
 4. Hini ar moc'h pe ar saout a zo.
 5. Ket c'hozh en oad gour.
 6. Div c'hoar — n'eo ket namn.
 7. O goulenn a reer da vezañ kelaouet.
 8. Perzh ul lec'h ne baker ket tomm enañ.

(disoc'hoù p.)

Nevez digoret e Naoned
ENEZ AVALON
Sevenadur ar broioù kelt



Stal
**LENNEGEZH
SONEREZH
ARTIZANELEZH**
ar broioù keltiek

11 straed Sant Pêr
(tost ouz an Iliz-veur)

Prioldi Baz, tresadenn gant Patrice Birket.

Biskoazh Ma Lunedoù!

DANIEL DOUJET

• Kavet war *Dihunamb* Niv. 6 (1995)
Kerzhit da reiñ "alioù mat" seurt-se, bremañ, d'an dud,
war n'eus forzh peseurt kazetenn ha ne vo ket pell an
S.P.A. da zont da stokiñ war ho tor!

ALIEU MAT

Eit pellat el logod hag er rahed

Mar fal d'ob skarhein el logod hag er rahed er mata a hon
ti ne hoes nameit tapeln e bia deu pe tri benak anebd.
A pe veint tapet d'ob, kenetreit ind get ur huilian ha
soulet ind er ur podad koulltron betag ou goug. Lausket ind
ezre de radek ; er bla anebd e lakou ol ou hamoret de
deheim kuit ne vou ket pel.



• Bepred war *Dihunamb* Niv. 6


Ur skandal : melc'hwed, buzhus, tousegi ha douar a ya
d'ober sistr.

Ha n'eo ket ar memes Loeiz a gane :
"En zo gwad ar gwir Vretoned
Heptan n'hellomp beviñ
Chomomp fidel d'ar sistr pautred
Mes goumomp en eviñ"

Ur skandal arall : lakaat a rae Loeiz Herrieu ar brud da
reded ne oa nemet kaozh-hach e-barzh gwad ar gwir Vreton-
ned!



Bève en akustumans, ar er meza e ve malet en avaleu gounde
koue. Eganl en de e ver er park o labouret, ret mat e ve enta ham
zigal d'en dou ar er chiste, ha mes pe ve arria en dou, ne ve ket mui
gadet forh kaer, hag el ma ve karga er skilennou get paleu, aveit
muoet fonaplab, es e kompren pousas e ha meur a veldeien, meur
a valhigon ha, lies mat, meur a sloug d'er veit. Doue e stag eie
lloñ en aviters e pe en dou ha rah, en dra, se e ve malet hag e ia
d'ober chistr.



• Kavet em eus war *Télé 7 Jours* ur merk servietennoù a ra
enor d'hor bro ha da yezh hon tadou-kozh.

Ar merc'hed fur hag avizet-mat a breno ar servietennoù
Slipad rak mat int ha marc'had-mat ; servij a c'hellont meur
a wezh!

Goude'hemenoù d'ar stal vat-se evit bout kavet un anv
ken azas ha ken jaobjabl war un dro.

Ar servietennoù *Slipad* ne vezont kavet nemet e ti an
apotikerion vat.

Goulenmit groñs kaout ur slipad!

• Ne vez ket trist O-I! bemdez !
"On croyait à une simulation"
"De la bavure apparaissait..."
Aliese sonjal e oa ur c'homiser (la bavure) hag e baotred !



• Kavet e-barzh buhez *Sant Fransez a Asiz*. Piv en deus laret
e oa seurt levrioù trist hag arabadus ?

*Sant Fransez e zask d'e ziskibien senti
war an toal.*

Senti!... Asa eo kement-se da lavarout, diaesoc'h
arad da viout.

Fransez, koulzkoñde, a c'houlenne digant e ziskibien
senti, ha senti war an toal.

Enn dervez e ilentias unan anezo. Ar Sant a
reus kevret tonilla eur bez, ben diskenn emann ez reo,
eu e sav, ha lezel traw warnan da garga ar bez. So
vet an traw betek kroaziez ar Breur, e c'houlennas
outan :

« Ya Breur, ha marvet out ? »
— Ya, va Zad, keus am eus d'am feñ'leñ, hag an zav
a ran en eus merlet ar maro.

— Mat, peseurt out maro, sav neuze ha deus er-
maez. Met hiziriken, toal ezve, ha bez mat da senti
war an toal. »

Eur wech all e tonas douz zen daveñt eñt beza
degeneret en Urz. Setu ma lavaras d'ezo evit o antrout :
« Lakañ d'in ar c'baol bihan-se en donar o dellou
d'an traw hag o gwizion d'an neñ'h. »
Unan anezo a sentas, met egile ne reas ket :

« Em bro-me, emezan, ne vez ket plantet ar c'baol
en doare-se. »

Fransez a zalc'has an hini kenta ; d'an eñt avat e
lavaras distrei d'ar gêr da intent ouz e gao.



Hold-up e Roazon

Personne ne pouvait donc donner l'alerte. L'ar-
tente a duré une heure et 10 minutes. Dans une
atmosphère lourde, les acteurs involontaires de
drame conservaient leur calme. « On croyait à une

simulation afin d'exercer le personnel de la ban-
que... »

camionnette stationnée à proximité. Ils agissaient
avec calme sauf l'un d'eux. « De la bavure appa-
raissait aux commissaires des lèvres de celui qui
paraissait plus nerveux », dira l'un des témoins.

OF 25-05-85

DISOCHOU "JOB"

niv. 27/28 p.43
gerioù-kroaz

	1	2	3	4	5	6	7	8	9
I	K	O	U	M	A	N	A	N	T
II	E	N	T	A	N	A	D	U	R
III	F	A	N	K	E	N	A		
IV	E	N	O		T	O			
V	L	I	V	O		R	I	E	N
VI	E	S	A	N					
VII	G	O	U	L	A	Z	H	A	N
VIII	E	T	A		Q	U	E	Z	E
IX	D	O	U	A	A	E	R	E	Z

anv ur skrivagner

	2	4	6		
H	E	G	A		
E	R	R	E		
I	R	E	S		
H	E	R	R	E	U
U	N	O	B	N	A
N	O	I	A		
E	G	A			
N					

niv. 33/34 p.
gerioù-kroaz

	1	2	3	4	5	6	7	8
I	K	R	A	N	K	E	T	A
II	E	E	R		R	E	I	N
III	R	M		R	E	T	O	
IV	E	H	G	A	N	N	O	U
V	Z	R	E	N		U	E	
VI	E	N	O	R	A	R	O	
VII	N	O	E	R	E	O	U	
VIII	N	Z	L	D	O	U	S	

Kevredigezh

C'HOANTEGEZHIU BERR

War niverenn 31 *Al Lany*¹ e savet a-enep da Loeiz Andouard pa skriva hemañ : "Ar Vretoned (...) a vez berr o c'hoantegezhioù. N'o devez ket c'hoant peurliesañ da sevel uhel er gevredigezh. A-walc'h ganto alies tapout ur stad-a-vuhez hag a ro tu dezho da vezañ dibreder hag en o aez." Poent eo kinnig abegoù.

Ur wirionez eo ar frazenn gentañ. Hogen n'eo ket un tamall atav. War dachennoù zo e rankomp, dre ret, krennañ hor c'hoantegezhioù. A-wechoù e kavomp gwel, dre zibab, chom hep mont ken pell ha re all : disheñvel e vez, da skouer, doareoù an F.L.B. diouzh re an I.R.A. hag an E.T.A., amañ, ne vez lazhet den. Mes embann e vez berr hor c'hoantegezhioù, hep displegadenn da heul, a zo reiñ digarezoù d'ar rannvroelerien ; se eo a rebechan. Ne fell ket din, koulskoude, astenn ar gaoz war ar gudenn-se ; gwel e kavan, evit kregiñ, en em zizober diouzh an div frazenn all. Hervez Loeiz Andouard, ents, ne blij ket

d'ar Vretoned, deomp-ni neuze, mont eus ur renkad uheloc'h. An tech-se, d'am soñj, n'eo ket breizhek-rik.

Krediñ a reer alies e fell da bep hini sevel er gevredigezh : c'hoant en dije ar micherour da vezañ un aotrou. Ha krouet e vije bet ar skolioù evit gwalch'hiñ ar c'hoant naturel-se. Gwiroc'h e vefe lavarout, koulskoude, ne fell da zen kouezhañ eus lost ar c'harr. Ma seller ouzhañ taolennoù ar sokioourien c'hall² e weler diouztu e vez tuet an dud, paour pe binvidik, da chom en o renkad. Apotiker e vo mab ar marc'hadour-louzoù, pe dibab a ray ur vicher gevatal. Ne vo ket karr-an-teil forzh penaos. War ar c'hraf-se n'omp ket disheñvel.

Kemmoù a c'hoarvez ivez. Ma gouezh d'ur vicher mont da get, pe bezañ war he diskar, e vo ret da vugale ar vicherourien klask labour e lec'h all. Pa ne voe ket pesketet ken ar sardin, da skouer, pa serras ar frituriour, ez eas mab ar martolod da izofiser avor. Sevel a reas er gevredigezh. Ur mab all a yeas da vicherour, pezh a zo disken³. Talvoudus e vefe, er c'heñver-

se, gouzout war be du ez eomp. O tiskenn emaoomp, pe o sevel ? Ne gomzan ket hepken eus an dud a zo o chom en hon nav rannvro, hogen eus ar re harluet ivez. Ne dalvez da netra fogañ ez eus un ti gant pep den o chom e Breizh, evel ma reas ur gelaouenn barizian, m'emañ al lodenn vrasañ eus an dud ganet amañ e rannioù strizh ar bannlevioù estren.

Ne saver ket er gevredigezh, ha ne ziskenn ket kennebet, a rampadennoù. An izofiser hon eus meneged a-us a vo e vab kelennner en ur skolaj, lakaomp. Gop e dad o tont ingal en deus skoazellet anezhañ p'edo war e studi. E vab a vo kelennner en ul lise. — en deskadurezh e oa e dad. E vab-bihan a vo kelennner skol-veur, — ur boaz eo er familh sevel en deskadurezh a rummad da rummad. Mab an hini diwezhañ a vo ur ministr. — brav eo studiañ el levrioù, mes talvoudus eo ivez plediñ gant ar vuhez wirion. An holl vibien-se o deus bet breudeur ha c'hoarzed a zo chom e renkad o zud. Lod zoken a zo diskennet ize-loc'h.

Ar vugale, koulskoude, a fell dezho, an aliesañ, chom heñvel ouzh o zud. Setu perak ivez ne savont nemet pazenn ha pazenn. N'eo ket avat evit abegoù kar-ar-renkad, mes evit derc'hel o c'hempouez psikologel, evit abegoù emgarez. Ur paotrig a fell dezhañ bezañ heñvel ouzh e dad, ha labourat a ra da dizhout ar palse. Ul labour diabarzh ez eo. N'eus ken gwelout pegen eñus en em gaoz ur bugel p'emañ war lec'h-labour e dud ; ar stal, ar vag, ar parkeier. Mes ar re nemeto a gompren mat ar blijadur-se, hag a zo gouest d'anavezout anezhañ, a zo tud ar memes renkad. En o aez e vez ar bugel en o zouez neuze. Ar skol ne daol ket evez ouzhañ ar dra-se, petra bennak m'eo komprenet mat gant lod eus ar gelennerien.

Un dra a zo drol, koulskoude, a lavarfe Veig Trebern : an darn vrasañ eus ar micherioù a ranker c'hwitañ er skol evit kaout an aotrou d'o dibab. C'hwitañ er gevredigezh, da lavarout eo chom hep pakañ ar vachelouriezh. Hen

diskouez a ra an deskadurezh pa ro arc'hant d'ar skolioù hervez niver o skoldi aat da vachelourien. War-goll e ya ur skolaj gant ar re all.

Ur bugel a fell dezhañ bezañ micherour ne vez ket berr e c'hoantegezhioù. Kalz nerzh a zispign da herzel ouzhañ c'hoant desk'hiñ, da chom morvitellet. Kalonek e rank bezañ, dreist-holl, pa asant bezañ didalvez, a eil-renk, ken nemet evit chom heñvel ouzhañ e dud. Ne daoler ket kalz evezhañ outañ, kemeret eo bet ar pleg gant ar rummadou micherourien. Pa gouezh an ekonomiezh en he foul, p'en em gav dilabour, — da lavarout eo pa goll ur vicher disprizet —, n'eo ket souezh en em gav gwan. Rebechet e vez outañ. Hogen piv en deus roet fiziñs dezhañ ? E vicher en deus dibabet, hervez, peogwir ne oa mat da netra.

Un eted all he deus c'hoazh ar fealded ret d'ar renkad. Div reizh a zo, betek-henn, er sevenadur. Bez' ez eus ivez daou rummad labourerien : ar re a labour gant o daouarn, hag ar re a labour gant o spered. Gwelet hon eus e oa kizidik-kizidik ar bugel ouzhañ rannoù ar gevredigezh, gouzout a ra matre e lec'h emañ. Lakaomp e c'hoarvez d'ur bugel, ganet er werin, desk'hiñ aes er skol. Kleout a ray, ur wech bennak, e dad o lavarout dezhañ : "Bremañ, n'out ket ken ul labourer-daouarn, evelton, mes ul labourer-spered." Gourc'hennenn pe dagadenn, ne voutro ket nemeur ar bugel o klevout seurt komzou. Gwel e kavo nac'hañ e lemmded-spered, — hag hi disheñvel koulskoude diouzh lemmded-speredal ar vourc'hizien gran.

Ar skol, neuze, hervez urzhioù ar Gelaouenn *D'Isiel*, a ro ur c'hañs da bep hini. Daou ster en deus ar ger e galleg. Un eurvad e c'hell bezañ ar c'hañs, mes ivez "c'hañs" ar statisti-



DEGEMERET EO BET YANNIG ER SANTIPIKAT

kou : unan a vutun daou bakad Gitanes Mais bmdex en deus muioc'h a c'hañs da bakañ ur chrign-bev en e c'houlletichenn. Gwir eo ar c'homzou ofisiel hervez an eil ster.

Mesket e vez, avat, an daou ster gant ar bolitikerien. Krediñ a reont ez eo un eurvad da bep hini sevel. Touellañ a reont ar bobl ! — na petra. En ur vro zemokratel an eurvad nemet eo kaout skolioù, ha roet eo ar c'hañs d'an holl. Roet eo, n'eo ket kinniget d'ar re furañ d'he fakañ. Pal ar gelenmadurezh-Stad eo lakaat an holl da sevel a-gevret, da gentañ, ha, da c'houd, reiñ frankiz d'an hinienn da sevel. Peseurt talvouddezh he deus c'hañs unan bennak, pa gouezh ar re all a-gantadoù ?

Meur a renkad ez eus ouzhpenn er gevredigezh. En tu all eus an dienez-rik ez eus ivez meur a zoare da vezañ dibreder hag en e aez. Ar vourc'hizien-vihan a gred dezho ez int ar re nemeto o tizhout ar palse. Diwir eo. Bez' e c'heller bezañ dibreder hag en e aez e ti ur martolod, ur micherour pe ul labourer-douar. N'eo ket ar preder pe an azemant a lak an dud da sevel pe da chom, mes an ezhomm pe an diouer a frankiz. Ar frankiz a zo diouzh talvouddezh an dud. Ur micherour n'eo ket gwalleus abalamour d'e vicher, mes abalamour d'ar begoù-mersi-meus-kedim a fell dezho reiñ en-dro e dalvouddezh d'al labour-dorn.


Bez' e c'hoarvez, a-wechoù, e ranker anvav, d'ur bugel eus ar bobl sevel uheloc'h eget ar re all. Rouez eo ar re a ya betek penn an erv. Ur skoul eo ar skol, kalz a gouezh en traoñ pa vez tennet,

goude bezañ chomet er vann ur penna-dig. An dud a youl vat a lavar ez eo tenn dezho menel abalamour ma ne anavezont ket an dud a cheñfe o c'hañs betek ar plasoù mat. Me 'grede kantoc'h ez eo start dezho dre mat'z int aet re bell diouzh ar re a garent. Estren en em gavont en o bro.

El lennegezh c'hall, e bro Jules Ferry enta, ne gaver nemet pevar skrivagner brudet eus ar ouenn-se, daou Vreizhad a zo en o zouez : Guehenno, Guilloux, Giono ha Camus. Louis Guilloux a ouie lavarout e oa heñvel ar skrivagner ouzhañ ur micherour war e gont⁴. Cho-net e oa stag ouzhañ e orin, dre heñveldegezh kentoc'h eget dre reizh, evel iust. Mes pezh a zo heñveldegezh e-keñver skiantoù ar gevredigezh a c'hell bezañ reizh e-keñver frammoù-spered unan bennak. Dreist-holl p'eo graet an heñveldegezh gant ur barzh awenet. N'eo ket ret enta kemer micher e dad evit bezañ heñvel outañ, mes ret eo d'ar vugale menel heñvel, tamm pe damm, ouzhañ o zud.

E diabarzh ar gevredigezh n'omp ket disheñvel diouzh ar pobloù all. Evelto omp tuet da venel en hor renkad, ha pa savomp, hen ober a reomp pazenn ha pazenn. Setu pezh a lavare ar sokioouriezh. Klasket em eus ouzhpenn dielfennañ peragoù zo eus ar pleg-se, skoazellet on bet gant ar psikologiezh. Kaset on bet ganti etrezek ar politikerezh, Poent e vefe kregiñ gant an ouennonezh hag ar geneadonezh.

Div dresadenn gant Langleiz, tennet eus Yannig a oar-lenn, 1964.



yannig en e gavell. mari a sell outañ

HOR YEZH

KELAOUENN A YEZHONIEZH

Savet e 1954 gant Arzel Even

Renner : Per Denez

ouzhpenn 160 niverenn

deuet er-maez


—niverennoù all e-maez rummad—

komunant : 60,00 lur (evit peder niverenn) ; kas ar chekennoù da Y. Debordes 1 pl. Charles-Péguy 29200 LESNEVEN

Ne vo ket graet hiziv, avat, ne rin nemet kinnig hentou.

Heñvel omp ouzh ar re all, mes, e diabarzh pep micher, e c'hellfemp bezañ disheñvel. Mat e vefe ober enklaskoù war doareoù ar vistri e Breizh. Degas a rin d'ho soñj ivez emomp en ur ranvro, "ur seurt damvuzeh enni!", e-lec'h ma vez stank ar vevelien ha rouez ar renerien. Renet uhelañ ar vro, ar prefed, a vez anvet. An disterañ kelenner a vez notet hervez pezh a anver, gant ar vevh, e "capacités à servir". Renet omp gant bagadoù Bécassines, ar re nemeto zo ouzhpenn, pa n'eus ket ken a vitizhien. An Itronzed de Grand'Air avat n'eo ket aet o gouenn da get.

Studi hor sevenadur hon heñcho ivez en anaoudegezh hon natur. Un arzour, gant muioc'h a breder eget e genvroidi, a bleustr da zizoleñ andonioù gwirion e gizidigezh. An oberoù o deus padet o hoal a-hed an amzer a bourchas titouroù war hon boud. Gant o skoazel e c'hellimp, moarvat, muzuliañ hor c'hoantegezhioù, ha dibab an tachennoù ma kreskint. Kent prezeg eus kement-se, koulskoude, ez eo gwel paouez ha prederiañ un tammig.



Gerioù Bugale

Lod a blij dezhe paperat mgerioù o zi get gerioù-stur renerien-spered ar bobl. Lod arall, koubladù yaouank mod-nevez a lak kentoc'h "gerioù" o bugale.

N'hellan ket siwazh ober kement 'rall ; 9 lur e kousto din an toull tachmeud pa zilezin ma zi ; merket e oa war ar c'hevrad. Ha get ar flaper a baotr am eus, hag e vreur e kignat e roudoù, ne vehe mui tachad ebet dijabl edan berr. Met skriv e-barzh *Al Lanv* a c'hellan hag a rankan memes (peilgorz a ra din ar rener e-kreiz an noz a wezhioù evit ma broudñ da labourat !)
Setu neuze traoù farsus klevet get ma mab Keven, a zo pevar blez hanter. Levrioù a zo bet savet e galleg war gerioù ar vugale met e brezhoneg n'eus ket bet. A bep seurt a vez klevet koulskoude !

• Erru eo skuizh e feltrenn ; ne skrivet ket mui mat ;

N'eo ket du ar feltrenn, du-splann eo

• En ur vont d'ar skol e tremenomp dirak un ti-diskuizh evit ar re gozh :

Petra eo an ti-mañ ?

*Un ospital evit ar re gozh !
...Hag ar re vrav a ya e-barzh un ospital arall ?*

• Gerioù zo e ra un implij farsus anezhe : savet en doa un treñ duplo (legojoù bras). Me da dostaat ha da gas pour !

*Dispar eo ar pezh ho peus graet !
ha en dilore'h :*

Ya, dispar a-walc'h !

• Tremenet eo bremañ met ur prantad klotadennoù en deus bet, ur barzh gwirion : diwar "rapata" e save gerioù da glotñ get unan ag ar frazenn a-raok.

*Me zo kreñv, evel ur rapatakreñv !
Vil eo an amzer, vil evel ur rapatavil !
Mael (e vreur) zo ur strabouilh, evel ur rapatakouilh.*


Lod ag e glotadennoù ne oant ket forzh jaouiabl !

• Goude ur pred e ti e dud-kozh, e-barzh ar c'harr, war an hent da zont d'ar get :

Hama, fiskal e oa, mabig, plijadur a zo bet !

*Ya, plijadur zo bet, un tammig plijadur, met pas plijadur-dur-dur-dur !
Memes tra pa gomze ag :*

ur mell menez, menez, menez, menez !



• Hag er skol (Diwan) e kleven en deiz arall unan e lipat e vourroù peogwir e oa *avalou-douar e h'witet* da verenn.

Ar mintin-mañ c'hoazh em boa klevet daou dra na oant ket fall. E c'hoari kartoù e oamp, "memory" eo anv ar c'hoari, ret eo treiñ kartoù ha laret o anv a vouezh uhel ha goude klask div hañval.

Unan a dro ur gartenn ; (ur c'hi e oa)

Petra eo ? Ur c'hi

Unan arall (ur gloud he doa tennet) *Petra eo ? Ur c'hi-bou !*

Ur prantadig war-lerc'h, ur gartenn arall :

Petra eo ? Un dourenneg !

Ne ouit ket petra un dourenneg : ur seurt jav get "dourennoù" du war e geñ.

• Ur wezh e oan e sellet doc'h un desadenn graet getañ, petra oa ?

*Ha kaer eo an amzer, daou heol a zo !
Evit rouzñ buan hag aes, kredapl.*

• Ar galleg a c'hell bout treuzkomprenet ivez, meur a wezh, get ur brezhoneger bihan.

C'hoari cow-boy a ra bemdez get bugale e garter. Bukiñ a ra warne e fuzuilhenn hag evelte e huch, a-bouez e benn :

Morlaer !

Ar re 'rall a gompren "mains en l'air !" hag a sav o daouarn d'al lein :

tizhet eo ar pal atav. Ha petra 'vern : atav e plije ar brezel d'ar vorlaeron !

• Ne vez ket aes bemdez deskiñ brezhoneg d'ar vugale : ar muiañ a vizer en deus bet e oa evit kompren e oa glas ar geot.

N'eo ket glas, gwer eo !

*N'eo ket, Keven, glas eo ar geot !
N'eo ket glas, gwer eo, gwer ha glas n'eo ket ar memes tra, 'verti', memes, e galleg !...*

Petra reoc'h, e galleg emañ evel-se hag e brezhoneg mod arall !

Ha en aet kuit, daoulagad du en e benn, en ur c'hignousat :

Ho, erru on-me poazh get ar brezhoneg nul-se a lar emañ glas ur pezh a zo gwer... Me laray gwer ha... setu !

An heni a raio tro Breizh-Izel get e garded, a selouo doc'h ar vugale, a skivo ar pezh a glevo, hennezh a c'hell sevel levrioù hag o gwerzhñ dre ar c'hilo !

DANIEL DOUJET

SKRID

DANEVELLOÙ
BARZHONGOÙ
TROIDIGEZHIOÙ

skrivet dreist-holl gant tud yaouank pe pennadoù nebeut-anavezet hor skrivagnerien veur

rener : Gwendal Denez

koumanant evit peder niverenn :
40,00 lur da Ber Denez
Rl, Ploare 29000 Douarnenez

• Erru eo skuizh e feltrenn ; ne skrivet ket mui mat ;

N'eo ket du ar feltrenn, du-splann eo



YEZH

PADRIG AN HABASK
LOEIZ AR C'HERE
TUDUAL KALVEZ
JEAN-LUC DEY

EMGLEO BREIZ

Abaoe ur pennad e weler o tont stankoc'h-stankañ war-wel pennadoù *Emgleo Breiz* er c'helaouennoù. Evel kannaded Breizh ar P.S. emaint krog da firobouch evit klask, pe reiñ da grediñ e klaskont, lakaat votiñ danvez lezenn Destrade er parlamant. Nevez zo zoken eo aet *Emgleo Breiz* betek skrivañ ul lizher-digor start a-walc'h da Laurent Fabius (7 a viz Mae) da damall dezhañ bezañ chomet diseblant ouz ar goulennoù graet outañ, evit ma vefe lakaet ar gaoz en dialec'h-mañ eus ar parlamant war rentañ-kont Yves Dollo. Goulen digantañ enskrivañ ar gaoz-mañ war roll ar parlamant a ra *Emgleo Breiz* ha war-un-dro tamall dezhañ bezañ dija kemeret an diviz da seblañ an danvez lezenn. Fin a-walc'h eo *Emgleo Breiz* da zegas da soñj da Fabius an holl ginnigoù bet graet gant ar beder gostezenn bolitikel vras, da bouezañ war ar c'henasant, ken klasket all, a c'hellef genel diwar ginnigoù ar P.S. ha war ar gound politikel a vefe da denañ eus ar stal-mañ. Gouzout a ra *Emgleo Breiz* e vo re ziwzhat en

diskar-amzer, tremenet da vat ar c'hañs da welout ar gouarnamant P.S. seveniñ promesaoù François Mitterrand war ar yezhoù rannvro.
Silennerzh politikel ha netra ken, setu petra eo firoboucherez diwezhañ *Emgleo Breiz* ha kannaded ar P.S. e Breizh ! Ha ret e vo addegas da soñj amañ, ur wech c'hoazh, pegen war-gil e oa aet dija danvez lezenn Destrade e-keñver hini ar Peñseg ? Ha ret e vo addegas da *Emgleo Breiz* da soñj e dagadennoù kent er c'helaouennoù pe war ar post bihan a-enep klistourmerien an tu dehoù a oa o ren, neuze. Ganto, gant "ar brogrestid" e vefe cheñchet penn d'ar vazh... Arabat dezho bremañ pa'z eus c'hwez al losk gant ar geusturenn klask en em zidamall. *Emgleo Breiz* a zo eus kostez ar gouarnamant, ma n'eus den hemañ sevenet netra pe ken nebeut a dra eo da *Emgleo Breiz* da sammañ ar bec'h. Ne c'heller ket bezañ e-barzh ha bezañ er-maez. En em denañ evit tagañ e vignoned a zo aes, ober evel ar P.C.F., netra er galloud hag un danvez lezenn

goude bezañ aet kuit, a zo pilpousoc'h c'hoazh. Klask a ra *Emgleo Breiz* en em wennañ, en em zidamall, evit gellout tagañ an tu dehoù a-benn bloaz hag adkemer e blas e-kichen an Emsav Sevenadurel. Tra ! Amañ, petra o deus graet tud *Emgleo Breiz* p'o doa un disterañ galloud evel e ti-kêr Brest da skouer ? Mann ebet pe dost. Perak goulen digant Paris lakaat ober ar pezh n'eus ket start a-walc'h evit ober amañ bremañ ?
Chom a ralo stag anv *Emgleo Breiz* ouz ar c'hwitadenn-mañ. C'hwitadenn rannvroelourien ha paotred kar-o-yezh ar P.S. hag ar P.C.F. da lakaat ar gouarnamant da reiñ an disterañ tra a dalvoudegezh evit hor yezh-ni. Kreizennourien daonet, Galloued tout, e chomo renerien ar strolladoù gant pe a-gleiz pe a-zehoù e vefent. N'eus ket da gontañ warno evit saveiteñ hor yezh, na war *Emgleo Breiz* kennebeut.

PADRIG AN HABASK ■

STAMBOUC'H

"Morse n'eus bet e penn an Deskadurezh ur ministr ken berr e spered." Setu, en-seven, soñj ur sokialour a-zivout Jean-Pierre Chevènement. En hor c'heñver, avat, n'eo ket gwall zis-heñvel ar re a zo bet en e raok. Displegañ a ra, en un doare esun, o soñj : "Ne dalvez da netra kelenn d'ar re yaouank yezhoù ha ne zigorant perspektiv ebet dezho."

KOANTIG, DEOMP DA WELET HAG AR ROZENN...

Moarvat e kred d'an Ao. Chevènement e toull studi Corneille, Racine, Boileau, Sévigné pe Hugo hentoù drant an dazont d'hor bugale. Ne nac'han ket, evel just, e plij dezho ar werzenn-man-gwerzenn : hogen bep tro ez eus tu da gavout kerkoulz en hol lennegezh-ni. Ma lavar din : "Mignonne allons voir si la rose...", e respontin outañ : "Gwez kalonek va bro..." Ha ma lavar c'hoazh : "Longtemps je me suis couché de bonne heure..." e respontin, diouzhtu : "Bep mizhin e tarzhe broñsoù hag e tigone bleuioù nevez." E-keñver ar warzhoniezh dihevez, implij dioutin ar yezh, e kavimp ken aes all gwerzennoù teñval o ster en hor c'hanennoù kozh. Arabat ankounac'haat ouzhpenn ne gomzomp amañ nemet eus lennegezh evit krennarded. Perzh dibar al lennegezh c'hall, en diwezh, eo ez eo bet skrivet gant tud a-feson, abalamour da se, dreist pep tra e ranker he doujañ. Hag ar Ministr ivez a zo anezhañ un den cheuc'h.

Ne gollim ket hon amzer o tamall pizh an deskadurezh. A-walc'h eo adlenn *Summerhill*, gant A.S. Neill ha levrioù Cl. Duneton, *Parler Croquant* pe *Je suis comme une truie qui doute*.

KERNETRA

Kas a ra hor yezh da Gernetra, hervez. Perak, neuze, e c'houlennomp-ni e vefe kelennet brezhoneg ? Tri abeg a zo.

Bezañ proviñsiz, da gentañ, n'eo ket dispar. Nebutoc'h a frankiz a gaver e-mesk tud boas d'ober diouzh ali ar re all, droukoc'h e vezont zoken, pa n'o deus ket fiziañ ermo o-unan. Breizhiz, da skouer, a gav an tu da vezañ gouenleour amañ, daoust da niver an estrenien bezañ distrik. Un efed all eus ar



rannvroeladur a voe, moarvat, emzalc'h kriz hor c'henvidi, e dibenn an eil brezel bed, e-keñver ar vroadelourien. Ar gouarnamant sokialour, hiriv, a gav gwel en em ziberer diouzh e ministr sokialour a Vreizh Izel ha toullañ kaoz gant Marcellin.

Gant ar galleg n'eus ach'anomp nemet tud a eil renk, — pa rankfemp bezañ kevatal, hervez reolennoù an demokratelezh. E galleg n'hon eus nemet ul lennegezh korriganed. Ar brezhoneg a zegas deomp, ouzhpenn ar skridoù d'war hor penn, studi ur yezhadur dibar hag ur geriadur liesdoare. Ha perc'henn omp warno, a-unan hag a-gvet. Chom hep kelenn ar yezh eo kuzhat ar wirionez : n'eo ket renevez-Stad ken, mes strobinelezh pe fizik.

Gant ar galleg n'eus ach'anomp nemet abaoe kant vloaz, a-raok ne oamp nemet teñvalijenn hag huñvreoù. Hor yezh, avat, hor stag ouz un hengoun all, ha talvoudus e vo hemañ d'hor bugale ma rankont kemmañ alies o doareoù bevañ. Izili omp eus ur gevredigezh a zo chomet unan abaoe Oadvezh an Arem, a-dreuz hini an Dir, ar mareadoù Kristen, ar c'hantvedoù Kristen. Adstummet hon eus bep tro hon doareoù. Pompus eo seurt komzoù, evel just, mes, war an dachenn-mañ, n'omp gour e-tal ar C'hallaoued gant o miniteloù hag o Zrede Republik.

SKOLIDI DIGRAN

Un eil abeg a zo. Reizh eo d'ar skolidi gran deskiañ ar yezh hag al lennegezh a blije d'o zadoù-kozh, ha klask, neuze, mont war-raok dre an hent bet toulltet dezho. Ur mad eo evito ;

Akademiezh Pariz en em gav evel-se e penn ar re all, ha n'eo ket ur souezh p'eo poblet ar gêr-mañ gant tasmanoù skrivagnerien gozh ha gant korfoù ar re a-vremañ. Er penn all en em gavomp. Ne vefe ket a-enep reizh ivez deskiañ d'ar skolidi digran ne oa ket berr spered o zadoù-kozh, hag enoriñ hon Anaon-ni.


P'en em gav diaes al labour-douar hag ar beskerezh, pa vez serret labouradegoù, ha, dreist-holl, pa n'eus ket gouest da lakaat an ekonomiezh en he

ALBOM CHOLORI
1983-84
'ZO E GWERZH!
120 lur

AN HERE
16, Street Jules Henriot
KERDREZEG
29000 KEMPER



★1



sav, e c'heller atav gwellaat stad al labourerien war dachenn ar spered. Gant ma kredor, evel just, int speredek. Ret eo krediñ ivez ez eus er gevredigezh kevredadoù labourerien estraget re al labour ; kevredet int amañ dre ar yezh. War ar c'hraf-se e c'hell ar gouarnamant reiñ frankiz ha surentez, pa n'emañ ket evit hen ober war hini ar goprou.

Ret eo ouzhpenn krediñ start, da lavarout n'eo ket krediñ en un dra hag er c'hontrol, war un dro. Pe emañ an da-zont eus tu al labourerien, pe emañ eus tu ar vistri.

UN TREDE ABEG

Un trede abeg hon eus da c'houlenn brezhoneg en hor skolioù. Bez' emañ an da-zont, hervez, eus tu Europa. Anavezout ar brezhoneg, dre lakaat kelenn anezhañ, a vefe, evit ar Stad, kompren e c'hell unan bezañ disheñvel hep bezañ estren pe disteroc'h. Ur

ouiziegezh talvoudus d'ar vuhez europat.

Evidomp-ni e vije tu da vroudañ, emaez ar Stadoù, un dro-spered europat. N'eus ket kalz broioù ken europat, e gwirionez, hag hon hini, o vezañ m'hon eus bevet e lec'hioù disheñvel el ledenez : Bro-Alamagn, Bro-Velgia, Breizh-Veur, gwalarn Bro-Spagn, o vezañ ivez ez eo ken kozh hor sevenadur hag Europa hec'h-unan ha m'hon eus ledet pep arakadenn sevenadurel : an Dir, ar Romanelezh, ar Gristenellezh... Gouest omp moarvat, kerkoulz hag ar stadoù trovadenner da gas an demokratelezh war-raok.

EVIT KLOZAÑ

Pa c'houlenner, arta, e vefe kelennet brezhoneg amañ n'eo ket tre an aluzen a c'houlenner. N'omp ket klaskerien bara, ha bara ar spered e ve. Fellout a ra deomp e vefe anavezet ur gwir, ha pa n'omp ket huñvreerren, e c'houlenn-

4/5★

nomp oberoù kentoc'h eget komzoù ha promesaoù, ha sokialour-rik o vent. N'eo ket ar gwir da vezañ disheñvel, evel ma lavaront, a vez goulnet ganeomp, mes ar gwir da vezañ ken dalvez, daoust ha disheñvel.

Ha broadelour eo kement-se ? Ne c'houlennomp ket, betek-henn, ur galloud politikel disrann, mes div pe deir eurvezh brezhoneg bep sizhun d'hor bugale. Diwezhatoc'h, moarvat e vo ijinet frammoù remerezh nevez, o klataat war un dro gant ezhommoù ar vro ha gant re Europa. Ouzhpenn-se n'eo ar brezhoneg nemet yezh tud Breizh Izel, da lavarout eo n'eo ket ar yezh vroadel nemeti amañ.

Ha diskiant omp a-benn ar fin pa c'houlennomp an div pe deir eurvezh-se evit miroù pevar mil bloavezh a sevenadur europat, — daou-ugent kantved a lavare Buonaparte e Bro-Ejipt, — hag evit lakaat anat ne dalvez ket al labourerien dre o nerzh-labour hepken. Ha pa ne dalvezfe ar c'hentelioù-se d'ar skollad nemet da anavezout ster e anv, pe hini e gêr, d'ober ur pennad fiop gant e dud, pe e dud-kozh, e kredan e vije bet a-walc'h.

AR C'HERE

G.S. Disonjet e vez atav un dra benak : m'o deus hor bugale ar gwir da zeskiñ brezhoneg ez eo abalamour m'int Bretoned. Gant va abegoù, hep ar resisaden-mari, e vije tu kelenn brezhoneg da forzh piv, d'ar C'hallaoued zoken.

Displegadurioù ar skeudenoù :

1. *Diwan*
2. *Bugale skol Sant Sebastien e Landernev gant o c'helennerez Mona Bodenne, G.V.Y. 85 (sk. an Habask).*
4. *Gwened, un tamm brezhoneg-sun.*
5. *An dibunadeg.*
6. *An dibunadeg prest da lañsañ.*
7. *An dibunadeg lañset.*
8. *An dud o selaou ouzh Jil Killivere.*
9. *Jil Killivere o prezegenniñ.* (skeudenoù T. Kalvez)

notenn — d'ar 05 a viz Gwengolo e vo barnet Jil Killivere.

SKRIDVARN "AL LANV"

Daoust m'eo pennadoù pep hini en hor c'helaouenn dindan e garg e vo ret amañ, en anv sturien *Al Lanv*, resisaat traoù zo a zo dizistag diouzh kenspered ar genlabourerien. Diwar-benn klazadur ar pennad "Stambouch" eo a fell deomp komz. N'omp ket a-du gant ar skrid evel m'emañ, ret e vije bet d'ar skrivagner, n'eus forzh penaos, spisat kalz e venozioù. Boul'hañ a reomp eta an diviz diwar arroudoù eus e benad.

"Ne c'houlennomp ket, betek-henn, ur galloud politikel disrann, mes div pe deir eurvezh brezhoneg bep sizhun d'hor bugale."

Ur gelaouenn sokialour ha breizhek eo *Al Lanv*. Daoust ma n'hon eus ket lakaet da c'her talbenn emener, disrannour pe vroadelour e fell deomp stourm evit reiñ da gumuniezh ar Vretoned ur galloud politikel disrann diouzh galloud Paris. Kement-se zo sklaer ! An derez emrenerzh gwirion tizhet gant ar Vretoned a vo diouzh o barregezh d'he lakaat da dec'hin dre ar stourm politikel ha sevenadurel. Evit *Al Lanv* eo stag-dizistag ar stourm da zieubin ar Vreizhiz evel labourerien dre ar sokialouriezh ouzh an hini d'o dieubin evel poblad diforc'h diouzh ar C'hallaoued. Ma n'omp ket evit tizhout ur galloud politikel disrann diouzh o rankomp stourm bremañ evit kemer beli er "rannvro" da adunvaniñ. Ouzhpenn-se, n'eo ket div pe deir eurvezh brezhoneg bep sizhun d'hor bugale a c'houlennomp hepken mes ar gwir ivez d'un deskadurezh vrezhonek, da forzh pe live, evel an hini boul'het gant *Diwan*.

"Ouzhpenn-se n'eo ar brezhoneg nemet yezh tud Breizh Izel, da lavarout eo n'eo ket ar yezh vroadel nemeti amañ"

Diwir. N'eo ar brezhoneg nemet yezh ul lodenn eus pobl Breizh Izel, ouzhpenn-se eo ar brezhoneg yezh an dud a ziviz ober gantañ evel Bretoned pe e Breizh Izel, e Breizh Uhel pe e lec'h all e vefent. Ma c'houlennomp ar brezhoneg da yezh ofisiel dre ma'z eo yezh vroadel pe vroadus Breizh eo evit ober anezhañ sinant unvaniezh Breizh. Yezh an darn vrasañ eus ar Vretoned, siwazh, a zo ar galleg. Pehini eta eo eil yezh vroadel Breizh hervez ar pennad ? Ma'z eo ar gallaoueg e vije bet ret skrivañ se sklaer ha splann. Da heul e vefe mat prouñ unvaniezh gallaoueg Breizh Uhel e-kenver yezhoù roman maezioù amezek Breizh ha diskouez al liamm etre ar gallaoueg hag emskiantegezh vreizhek Breizh Uhel. Dav dis-



6/7/8 ★

plegan eta petra eo eil yezh vroadel Breizh!

"Ha pa ne dalvezfe ar c'hentelioù-se d'ar skoliad nemet da anavezout ster e anv, pe hini e get, d'ober un pennad fleg gant e dud, pe e dud-kozh e kre-dan e vije bet a-walc'h."


Gwir eo e rankomp skeñ d'ar pleustrekañ en hor c'hentelioù brezhonek. Koulskoude, dre lakaat ar vagale da gavout o gwizioù, dre o lakaat da dommñ ouzh o yezh e ranker atav strivañ d'ober anezho brogarourien emskiantet a rano eus ar brezhoneg yezh o buhez.

"Gant va abegoù, hep ar resisadenn-mañ, e vije tu kelenn brezhoneg da forzh piv, d'ar C'hallaoued zoken."

N'eo ket sklaer-tre an evezhiadenn-se. Pal emsav ar yezh a zle bezañ diorren ur gumuniezh brezhonegerien bev-buhezek ha lanns. Seul grenvoc'h e vo ar gumuniezh-se, seul vuioùc'h a dud diavaez. Bretoned pe get, a vo dedennet ganti, a c'houlenno bezañ kentelhet war hor yezh hag hor sevenadur. N'eo ket anv amañ a redi groñs. Levezon pep sevenadur war an hinnoù a zo dia ar redi.

An nebeud evezhiadennoù-mañ a lakao traoù zo en o reizh, spi hon eus, hag a zegaso deomp ur respont lemm evel lagad pe minaloued ar C'hore.

AL LANV



Gwened 26/06/85

GOURARC'HOMP HOR GWIR!

Deuet omp amañ, da Wened, e-keñ-zer prosez Jili Killivere a vo barnet dimerc'her en abeg d'ar fed eo prezidant Skol An Emsav ha n'eo ket evit bezañ livet pannelloù eñ e-unan, a-giz ma vez rebechet dezhañ.

N'eo ket ar prosez kentañ a liverien pannelloù ha ne vo ket, moarvat, an hini diwezhañ. Unnek den zo bet kaset dirak al lez-vern abaoe ur bloaz ha kondaonet int bet d'ar prizon gant goursez — betek pevar miz — pe da baeañ tellou-kastiz — betek un hanter vilion a luriou kozh.

Kalet ha taer, ar stourm-se zo bet e-vedus pegoir e vo lakaet hep dale pannelloù hent e brezhoneg war vord daou hent bras eus Bro-Dreger gant Kuzul Jeneral Aotou an Hantarnoz. En hevelep doare eo, a-benn tri bloavezh stourm, hon defe gounezet ar C'h.A.P.E.S. brezhoneg, hervez ar pezh 'vez laret er c'hazetennoù...

An dra-mañ a ziskouez eo ar stourm hag ar stourm hepken a daol frouezh. Arabat kontañ war volontez vat ar pennoù-bras; ne roont nemet ar pezh 'vezont rediet da leuskel da vont.

Neuze, n'eo ket hepken kemer perzh en ur vanifestadeg ur wech an amzer zo d'ober. Ar manifestadegoù zo abadennoù da sevel a vare da vare evit diskouez o nerzh, met dav eo deomp chom hep ehan war an dachenn. Al labour pemdeziek eo, al labour e-vedus nemetañ.

— Pep hini a c'hell stourm en labour, en e sindikad, en e strollad politikel pe sevenadurel.

— Pep hini a c'hell mont da welout maer e barrez pe ur c'huzulier da c'houlenñ gantañ lakaat pe adlakaat an anvioù-lec'h e brezhoneg.

— Pep hini a c'hell skrivañ d'e-guzulier jeneral, pe da zepete e gornbro evit ma vefe lakaat ar brezhoneg da yezh ofisiel.

— Pep hini a c'hell skrivañ d'ar vinitred, d'ar ministr kentañ, da prezidant ar republik c'hall da c'houlenñ pannelloù-hent e brezhoneg, pe da c'hdulenn e vefe graet gant hor yezh gant ar ministradur.

Ha, ma n'eo ket a-walc'h, mont da reizhañ ar pannelloù e-unan, pe da lakaat re all. Krak-ha-krenn, ober ar pezh zo bet graet gant ar Gembreiz war an dachenn-se.

Goulenñ a reomp ganeoc'h :
— Mont d'ar prosez, ma c'hellit, dimerc'her a zeu 26 a viz Mezheven ;
— Sikour ar re a vez kaset d'al lez-vern ha kondaonet ;
— Kemer perzh er c'huzulioù skola-zell ;

— Goulenñ e vefe didamall ar re 'zo bet kondaonet ;
— Kinnig e vefe kroget da lakaat ar brezhoneg da yezh ofisiel en ur lakaat pannelloù-hent.

Ha, diest-holl, chomit war evezh ! Ar Vretoned a vez douget atav da entañ evit un abeg a from anezho, hag ur wech kouezet ar from e tilezont ar pezh o deus bet mizer da dapout. E-giz-se, da skwer, stourm ar chekennoù : gounezet hon eus gant poan an droad da sevel chekennoù e brezhoneg ha re nebeut a dud a lak an droad-se da dalvezout. N'eo ket a-walc'h dont a-benn da drec'hiñ, dav eo deomp seveniñ hor gwir war-lerc'h.

Neuze, bezomp dalc'hus ! Diskouezomp e kasimp hor stourm betek penn, rak perc'henned Breizh ez omp ! N'omp ket deuet amañ hiriv e-giz klaskerien-vara. N'omp ket deuet da gestañ, met da c'houlenñ groñs e vefe doujet gwirioù hor pobl, evit ma ne vefe ket troc'h ken etre lezennoù ar Stad c'hall ha droad ar Vretoned. Ar brezhoneg eo yezh ar Vretoned, setu perak e le dont da vezañ yezh ofisiel e Breizh.

Prezegenn Tudual Kalvez
e Gwened, d'ar 26 a viz Mezheven
1985 en anv Kenurzhiezh
Sevenadurel Breizh

Louisiane



« COUCHE-COUCHE » HA « GOMBO Z'HEBES »

d'ober al lu gant ar re a grade komz ar yezh bihanniver... Dindan urzh ar c'hdodofil e vo peget skritelloù triliv e pep lec'h, gant al luganoù amañ da heul, skrivet warno : "Soyez fiers de parler français" ha "Est-ce que vos enfants apprennent le français à l'école ?"... Laïset e vo menoz an div-

Bez' ez eus un dra, ur fed ha n'eo ket nevez e-mesk yezhoù pennañ hor bed a-vremañ : ar galleg a zo bec'h warnañ o kevezañ ouzh ar saoneg, er broioù ma vez komzet enno an div yezh kichen-ha-kichen. E Bro-Louisiane da skouer.

E-pad pell e oa chomet pennoù bras ar Stadoù-Unanet, a du gant an un-yezhegezh... saonek, evel just. Pal an unvezhegezh-se a oa sañset unvaniñ an embroidi nevez e-barzh ur mell pikol "melting pot" ma vefe komzet ennañ ur yezh hepken, eus aodoù ar meurvor Atlantel betek reoù ar meurvor Habask.

E Bro-Louisiane e veze difennet ober gant ar galleg er skolioù e 1920 hag e 1921. Ar yezh-mañ a oa bet degaset eus Bro-Ganada da Vro-Louisiane, e-kostez aber ar Mississippi, goude 1755. Gallegere e oa an toled-se d'ija, o vezañ ma oa deuet en o-raok Kreoled ha morianed a-villieroù a gomze galleg mesk-ha-mesk gant yezhoù all-ende. An embroidi nevez o tont eus Bro-Ganada a veze graet Akadiz (*Acadiens*) anezho, "Acadiens" a zeus da vezañ distaget "Cadiens", ha goude-se "Cajun" dre staonekadur. Ar yezh "Cajun" a zo eta ur yezh dre gomz nemetken, ha neket ur rannyezh nag un trefodach, hogen galleg an XVIII vet kantved komzet gant tud dizek war distagadur ha yezhadur ar galleg mod-nevez...

Tonket e oa ar galleg "cajun" da vervel, troc'het ma oa diouzh gallegva Bro-Ganada ha diouzh Bro-C'hall ivez. Miz Mae 68 a zegasas cheñchamant bras en tu-mañ d'ar meurvor Atlantel, miz Gouhere 68 a zegasas da Vro-Louisiane un doare reveulzi dishevel, e stumm un diviz bet votet gant Parlamant Stad Louisiana, a grouas ar *Conseil pour le développement du français en Louisiane*, anvet Codofil. Rener ar C'huzul-se, Jimmy Domengeaux hag a c'helle bezañ keñveriet gant Per Denez, evit pezh a sell ouzh e youl da gas ur stourm da benn, en doa touet e teute a-benn da lakaat galleg Bro-Louisiane en e blom adarre. Du-hont koulz hag e Breizh e veze dalc'het

yezhegezh er skol ivez. Na zisoñjomp ket n'eo nemet 19 % eus tud skolidi ar Stadoù-Unanet hag a soñj e talz ar boan deskiñ ur yezh estren pe un eil yezh estreget ar saoneg !...

Pelec'h emaeomp ganti hiziv an deiz, e 1985 ? Setu amañ respont Jimmy Domengeaux, a zo bremañ 79 vloaz : "Kalz a dra 'zo d'ober c'hoazh. Bevañ a reomp er gevredigezh amerikan ha n'eo ket gwall chalet gant pezh a c'hoarvez en estrenvro. Ministr Deska-durezh Stad-Louisiane a zo saoneg. Perak e vefe mantret gant lod ar yezh c'hallek ? Ouzhpenn-se hon eus diaze-



mantou e-keñver arc'hant. Deuet eo ar mare d'arboellañ : skarzhet ez eus bet kuit pevar ezel diwar eizh eus ar c'hCodofil. Ma teump da vezañ dilezet gant Bro-C'hall e vo bec'h war-nomp...

Jimmy en deus graet damveneg eus diaou fed a bouez bras : — abalamour d'al lezennoù strizh war an enbroaderezh, ne vez mui goulnennet kement a gelennerien eus Bro-C'hall, Bro-Velgia ha Bro-Gebek (Québec) ha gwechall. Seurt gelennerien a oa niverus a-walc'h dek vloaz zo (253), bremañ n'eus ken nemet 130 anezho. Dre c'hañs ez eus muioc'h-mui a gelennerien genidik eus Bro-Louisiane evit sammañ ar memes karg a gelennadurezh war o choug. 145 e oant e 1983-1984.

— d'an eil, divizet ez eus bet paouez da skignañ abadennoù-kelenn gallek o tont eus Bro-C'hall dre lestr-nij (satel-ite).

A-hend-all ez eo ret gouzout ne vo ket diskoulmet kudenenn ar galleg el Louisiane, ken aes-se, dre ma vez kelennet e skolioù ar vro galleg Bro-C'hall a-vremañ hag a zo disherivel a-walc'h diouzh ar galleg "cajun". Eus Bro-Louisiane e seller ouzha ar C'halloued evel tud speredek, desket,

gwisket kran, e berr gomzoù, evel tud "smart" anezho. Pa'n em gav an dud en ur "fais-dodo" (eleze ur fest-noz mod cajun !) e vez gwelet meur a hini o tañsal, hogen mont a ra an teodoù en-dro ivez. Klevout a reer eno n'eo ket galleg Pariz, na galleg Bruxelles, a blij ar muiañ dezho. Gortoz a reer c'hoazh ma vefe graet enor d'ar seurt galleg a zo bev buhezek c'hoazh war ribl ar stêr Mississippi.

Padal ez eus tud ivez a glask kas ar stourm war-raok en un doare all ; tud evel Philippe Gustin, ur Belgiad deuet da vezañ ezel eus ar c'hCodofil abaoe dek vloaz. Kredin a ra e labour an aozadur-se, met a-hend-all en deus roet lañs d'ur gelaouenn, *Louisiane* hec'h anv, a zeue er-maez dindan stumm ur follenn roneo hepken, da gentañ penn, ha tennet un nebeud kantadoù skouerrennoù diouti. Deuet eo *Louisiane* da vezañ, hiziv an deiz, ur gelaouenn viziek, ugent pajenn enni, ha tennet ouzhpenn dek mil skouerenn anezhi.

A-hend-all e vez skignet gant KRVS FM 88, war-dro 35 a eurvezhiadoù abadennoù-kelaouiñ ha sonerezh e galleg. KRVS FM 88 a zo ar skingomz divyezhek (galleg-saozneg) nemeti a c'heller selou e Stadoù-Unanet.

Un dra a zo sur bremañ : degemeret e vez menoz an divyezheger er skolioù gant muioc'h-mui a saoznegerien

ha oa gwechall, a-enep krenn d'ar galleg. Digoret ez eus bet klasoù divyezhek un tamm e pep lec'h dre Vro-Louisiane a-bezh, ha merzet ez eus bet e veze kalz gwelloc'h live-deskamant ar skolidi a ouie galleg koulz ha saozneg. E kêr vBâton Rouge, da skouer, n'eus nemet galleg er skolioù-mamm "divyezhek"-se, met n'eus nemet 60% er skolioù kentañ-derez, ha 16% a c'hall-galleg pa'z a ar skolidi tre e-barzh ar 6vet klas. Hervez an enklaskoù ofisiel e hañval an hentenn-se ober berzh. Bez' ez eus hentenoù all evel just, nemet ne fell ket da Vro-Louisiane heuliañ skouer ar C'hannada saozneger ma vez lakaet ar wugalidig saozneger en un endro galleg ar-grenn, betek ar 6vet klas.

Er Stadoù-Unanet ez eus en em lakaet un nebeud broioù, evel Bro-Oklahoma, California, Wisconsin ha Bro-Ohio da skouer, da gelenn galleg pe spagnoleg diwar skouer bro ar c'ajuns. Salv ma vo debret "couche-couche" ha "gombo z'hebes" er vro-se, e-pad pell annez c'hoazh !


couche-couche : kous-kous.
gombo z'hebes : soubenn domm !

JEAN-LUC DEY

Skleur al Loar war genou ar stêr. Ur gor a zeu da vezañ amañ. Klud an dud sparlet. Sinder hilligus. Ha te, Azenor, ach eus sanket ur yenn em c'halon gwak! Ha, me, Budok, non nemet un preñv-goulou e karantez gant ur steredenn-red!


envor-donvor...

KONKOU



ur vouilhez he divhar skritl oc'h ober lagadig din...

ERWAN KERVELLA
YUD



Emañ "Mouladurioù Hor Yezh" o paouez embann levr kentañ an dastumad nevez "Skrid".

Gouestlet eo da Erwan Kervella, aet da Annon warlene.

An darn vrasañ eus e skridoù, barzhonegoù, danevelloù ha pennadoù, a gaver el levr. Lod anezho a oa diembann, lod all a oa bet embannet dja war Al Liamm, Skrid pe Yod-Kerc'h.

"Yud" eo anvet an dastumadenn-se. Ma fell deoc'h resev al levr-se goulnenn anezhañ digant *Mouladurioù Hor Yezh*, 1 pl. Charles-Péguy 29260 Les-neven - priz al levr 40 lur + 10% mizou-kas.

HOR YEZH

IWAN KADORED

ISTOR
PEVARE CHADENN
SKINWEL KEMBRE

159



Merc'hig, roit din un darn eus ho Lorc'h. Ma hini 'zo aet da hesk.
 "Pleustret 'm eus ur pootr..." "... sankañ a rae e zent em divronn
 ken e skote..." "Dienn a Lakaen warno goude-se!" Baby give
 me your blues... Bruzun Karantez... e Termen...


Redek ma c'hwitell dre
 ar porzh. Me, test an
 noz, farouell ar
 goulou-deiz...



Azenor, ha dogonet
 az poa da gwaz
 kornek a natur?

Kasedadoù Leun a vutun. Trafikerien, me
 ho salud!... Korn-boud ar bigi dianket
 a g'lever o vlejal. Emañ ar qor o fareviñ

Beradoù mergl ouzh kof
 roeñvet ar bagou-karg... evel
 gwad...



E! VILTANSOÙ! UR CHIMIKENN
 MAR PLIT! AMAÑ 'Z EUS BUTUN!



Ya, va zad a guzhe e damm bara er mekanik-gwac'h... Te wir, merchieg! D'am choar en doa kinniget "bouzellou" evit he muan-karet...



sonj 'peus hor boa c'hoariet daou er gegin! Pebezh abadenn leir pe bader dwech! Hon nerzh oa bet da best...



Da feskennou war ar mein yen-sklas... Azenor.

re a ouzon bremañ evit mervel JOL 'zo savet emizili...

Ur c'hadi'LLag amerikan o vont Doue 'oar da belec'h. Ur bouilh moged de heul. E zaou-Lagad o turian an roz.



Edon o vale en ur bed iskis, blot ha yodek gloet a dorgosou kozh, skoulmet o barroù. Sachañ a ris war un torgos. Gwrizioù an torgos ne oant nemet daouarn skilfenek ha gwader...



Neuze e teuas ar mor da goevniñ. Foer chistr e foñs ur varikenn...



E-giz ur c'han-foll an nor a zigoras hag e welis a'chanout Azenor!

ober 'rez war e dro evel
d'ur poupig. N'eo ket dav
kemer kement-all a
boan! A-barzh pell
vo c'hwez ar sarr
gantañ!

Neuze, pichonig bihan!
Gwallgaset 'peus ma
zud ha dizoloet va
c'huzhadenn! Mervel a
rankez ober!

dijal

Azenor, va aelig-me. Poan
'meus da ijinañ dehanout er
q'wete gant ar penn garnel-se!

Eo! Laoskomp anezhañ
da vont, dieub. Mont
a rimp d'e heul gant
fuzuilhoù! Un taol-
chase divoutañ kaer.
Gwelloc'h e kavan
chaseal ur gwaz eget
ur gad....

Sed aze,
ur soñj
ifern.

Da belec'h eo aet an
deilasenn 'zo diskennet
a-c'haoliad gant an
dorn-red?

Pemp munut a roan
dit evit
skampañ
kuit!


Ren tuchantig

C'hoarzhadeg tev. "farsadennoù
ur soudard, a soñjis.

Salud dit Azenor, rouanez
an orged. Markizez ar c'hoari
daou - Bourevierez ma c'halon...

Laosket 'peus ur
chans ganin, Azenor.

Leizhen ar c'hoad.
Korf ur plach ...
Ha te, Azenor, ur
vleizez o c'hortoz he
freizh... Gortoz ha
gwelet.



Budok, klas repu en da grogenn
evel ar c'hrank-bigorn. Etre ar mor
firivus hag hedro hag an douar kalet.
Darev out da vont. Salud, Lakousenn
he daoulagad glas..




C'hwech'het Gouel Ar Filmoù Hag Ar Skinwel Keltiek



**C'HWEC'HVET GOUEL
AR FILMOÙ HAG AR
SKINWEL KELTIEK**

**DOUARNENEZ / ROAZHON
1985**



Setu tost da dri miz bremañ eo bet aozet C'hwec'hvet Gouel skinwel ha sinema ar broioù keltiek e Roazhon hag e Douarnenez. Ar wech kentañ oa dezhañ dont d'hor bro hag ar wech kentañ ivez 'vo dezhañ mont da Norz-lwierzhon, e Newcastle (an Caisleán Nua) ar bloaz a zeu. Newcastle : ur gêriadennig kaer-meurbet, skoachet brav deus Belfast gant ar menezioù Mourne. Kinniget eo bet ivez gant Kerneveuriz degemer ar Gouel e 87. Un dra vat eo, daoust ma n'o dije skinwel "rannvroel" ebet rak diskouez a ra kement-se eo krog ar gouel da vezañ keltiek e pep keñver.

AR PERAK

Met a-raok mont da Newcastle pe da Garmes-Veur e vefe a-bouez klask diskouez penaos ha perak eo bet degemeret ar Gouel gant Breizh, Marteze eo koulz lezel ar gaoz gant Per Denez, Pennrener ar Poellgor Breizhat, da zisplegañ ar perak da gentañ :

"C'hwec'h bloaz 'zo eo bet savet Gouel ar Filmoù hag ar Skinwel Keltiek. Abaoe pell e oa bet adkavet gant ar pobloù keltiek hengoun o c'humuniez sevenadurel — abaoe 1838, gant an emvod da geñver Eistezvod Abergavenni — met re hir amzer e oa chomet an darempredoù war dachenn an traoù kozh, gant keuz d'un tremened meurbet-doujet o vagoni dic'hoanag ha d'eroù. Tamm-ha-tamm, gwir eo,


AR FILMOÙ PRIZIET E GOUEL DOUARNENEZ



Ar film priziet div wech : Film Marc Evans, "Johnny Be Good" evel priz kentañ ar gouel hag evel Spered ar Gouel.

Kembre 1960, istor John, ur paotr yaouank hollspereour ha vak war-nañ, mab pennhêr ur merer, hag e zarempredoù gant Warren, ur paotr a-ziaevaz bro o labourat er vereuri.

Feurstaget e vo an daou vignon gant un darvoud : ar juke-box kentañ o tegouezhout er gêriadenn.
A-drugarez d'ar vignontiezh souezhus-se e tispleg ar film stourmad ar yezhoù kenkoulz hag hini ar menozioù, a zo hepred anezhañ e Bro-Gembre.



Priz ar rann "kelfilm" : "Silence to Silence".

Ar e'hefilm-mañ a zo bet savet e Dulenn hag e Bro-C'hall. Kontañ a ra buhez an arzour Samuel Beckett dre e bennadoù komz-plaen, e varzhonegoù hag e bezhoù-c'hoari.

Kinnig a reas evit ar film-se domskridoù diembann, ha kemer a reas perzh en aozadur ar film, a-gevret gant Richard Ellmann, buhezskriver James Joyce ha David Warrilow, arbennigour war vBeckett.

Ar sonerezh a zo gant Schubert, ar sonaozour a blij ar muññ da Samuel Beckett.

Evit ar rann "Ijin", "The Happy Alcoholic", savet gant Carl Francis.



Ar Mezvier Eürus

Istor Allan eo, ur mangleuzier yaouank o tont da vezañ ur mezvier. Kanañ a ra e laz-kanañ ar gêriadenn, hag en em gavout a ra e-tal rener al laz-kanañ-se, a zo distroet d'ar gêr goude bezañ graet berzh e "La Scala".

Kendere 'hel a ra Allan da lonkañ, ha da drilhañ e vouezh. Pilot a ra e wreg, gwallgas a ra e vamm.

Godisat a ra ar film en un doare spontus war ar vuhez e Bro-Gembre.



war un dro gant "The Fasting Girl", savet gant Robin Rollinson.

Ar Plac'hig a Yune — Dedennet e voe ar bed a-bezh, tro 1860, gant istor Sarah Jacob, mere 'h ur merer a vro Gembre — lavarout a ree tud he familh e oa-hi gouest da chom hep hep evañ na debriñ, hag he dda yunet abaoe ur bloavezh hep bezañ klañv, war a seblante.

Ur medisin a dremene ur pennad-amzer er vro a voe dedennet gant an afer-se. Evit annezidi Llanfihangel-ar-Arth, douget d'ar brizhkredennioù, e oa kement-se ur burzhud : tud all a gemeras perzh e divizoù entanet a voe e kelaouennoù arbennik a vezegerezh.

Ablanour da gredenn ispis he zud e varvas Sarah diwar ziouer boued d'un oad a zaoztek vloaz hanter.

Ar penmpet film eus ur rummad savet gant B.B.C. Kembre eo, krouet diwar genlabour ar skrivagner Paul Perris hag an aozer Richard Lewis.

e oa deut ar Gelted, hag int leun atav gant evnor an amzer gent hag he c'hlod, da vezañ prederiet muioc'h gant o amzer-vremañ ha gant o amzer-da-zont : gant al lec'h o devo o sevenadurioù er bloavezh 2000. Tonkadur o yezhoù, ya, met ivez, hag evit o yezhoù end-eeun, o berzh-mat war dachenn an embannerezh, al lennegezh, an arboellerezh, ar politikeriezh, hag all. Ur c'hammet bras all war-raok eo bet savidigezh Gouel ar Filmoù hag ar Skinwel Keltiek : digoret e oa gantañ d'hor yezhoù ha d'hor sevenadurioù, d'hon doare da selout ouz ar bed, tachenn ec'hon an tec'hnoù nevesañ : galloud ar son hag ar skeudenn o tegas d'hor bed kozh ur vuhez nevez — un advuhez.

War greskiñ eo aet ar Gouel-se, evel ar vugale yañ, a vloaz da vloaz. N'eo ket pennoberennoù hepken a zo bet diskouezet ennañ : met a bep seurt a ranker kout da reiñ buhez d'ur sevenadur ha, forzh penaos, pennoberennoù a zo bet. War vrasat eo aet ivez, er gouel, al lodenn dalc'h gant ar yezhoù keltiek — gant Kembreiz evel just da ziskouez an hent : magañ *Stanel 4 Cymru* e-pad 24 eurvezh ar sizhun a c'houlenn youl, ijin, ampartiz — hag a bourchas labour d'ar gembraegerien o deus youl, ijin hag ampartiz. Met, betek-hen, ne oa ket bet tra-zet. Mor Breizh gant ar gouel-se, Bremañ eo graet : daut eo ar Gouel d'hor bro. N'eo ket Mor Breizh, ar Vretoned a oar a-walc'h an dra-se. Un harz : ul lec'h-tremen n'eo ken. Bremañ m'eo bet desket an dra gant hor c'hendirvi tramor, e teuint sur-mat endro.

Krediañ a ran eo a-bouez d'ar Gouel, evitañ e-unan, bezañ deut da Vreizh. A-bouez eo evidom ivez reiñ degemer d'ar Gouel-se : en hor c'hêrbenn, Roazhon, hag e kêr Douarnenez a zo ken troet an diud enni gant an arz hag ar fiñskuedennerezh. Ur skoazell hag ur frealz e vo evit hon arzoerien, un testeni a anaoudegezh evit ar strollad tud yaouank a zo o labourat gant kement a youl ha kement a galon evit hor sevenadur hag evit "daoulagad Breizh". Roazhon, ya, ha Douarnenez ivez, met Breizh a-bezh an hini eo a denno gounid eus an emvod meur-se etre Kelted ar c'hwec'h bro.

AR PENAOZ

Ha bremañ stagomp gant ar penaos. Ha va c'hredit un istor all an hini eo bet ! E gwirionez a-raok mont da Gar-

diff e oa bet soñjet dija kinnig e vefe aozet ar c'hwec'hvet Gouel e Breizh. Ha dre-se e oa bet skrivet da holl aozadurioù ar vro troet war ar sinema hag ar skinwel e mod pe vod o c'houlenn diganto : hag-ef e oant dedennet gant ar seurt gouel-se ; hag-ef e oant prest da gemer perzh er veaj ; hag-ef e oant prest da gemer perzh en ur poellgor breizhat a oa war-nes bezañ krouet. Rak diaes e oa, war a seblante deomp, mont da Gardiff o kinnig aozañ ar Gouel e Breizh gant ma ne oa framm aozet ebet ! An aozadurioù prevez nemetken o deus respontet deomp d'ar poent-se. Ha c'hoazh e oa bet ret deomp pouezañ start war unan anezho d'an lakaat da gompren na pegen kaer e oa Gardiff hag he c'hastell (III). Da c'houde eo bet ret deomp klask ar c'hant. Rak evel ma ouzer dre vras, kaer eo bejañ met ker eo ivez ! Hag aze eo deut ar maout ganeomp dre m'omp deut a-benn da gaout skoazell an daou guzul pouezusañ e Breizh. Ha gant an arc'hant rastelet un tamm e pep lec'h (zoken digant ar British Council !) eo bet posupl deomp mont da Gardiff ha pediñ an Ao. Le Treut ha V.I.P. all a Vreizh da zont da gejañ gant aozerien ar gouel e Gardiff. A-bouez bras e oa deomp dont a-benn da gaout tud e-karg ouzhi aozadurioù diviz ar vro evit ma welfent pegen yac'h eo an aozañ filmoù er broioù keltiek all ha war ar memes tro evit ma c'hellfint kejañ ha kaozeal gant an dud e-karg deus an aozañ filmoù-se. Tizhet ar pal-se ganeomp d'an nebeutañ. Aozet ar poellgor. Ha bremañ, dont a-benn da ziskouez e oa prest Breizh da aozañ ar gouel. Hag aze Ma Salvar Benniget e tarzhas ar reuz da vat (rak kroget mat e oa dija) ! Hervez daou eus pennoù F.R.3 "ma oa ar seurt gouel da vezañ aozet e Breizh, bez' e oa da vezañ aozet e Roazhon !" Ha pik. Echu tout ha deomp d'ar ger ! Hag evel ma lavare ar jostrom a jeneral all e-pad ar brezel pevarzek : "ah ! les braves petits Bretons ! Ils veulent aller à la guerre !" Ha setu tarzhet ar reuz ! Un tamm skodeget e chome dileuridi kevredigezh ar Broioù Keltiek ! Ha pa laran skodeget... Abafet ! Talbaget ! Spontet e vefe kentoc'h, o welout ur wech ouzhpenn Breizhiz o 'n em zrailhañ dirazo gant kement a nerzh kalon ! "Deomp da Norz-Iwerzhon war-eeun !" a zlee soñjal lod anezho. Met tamm-ha-tamm, sioulik ha sioulik, e teuas an daou gamp a-benn, goude toullañ o foziou-difenn, da chom difiñ, tamoladet brav en o foziou. Etre an div anezho : an No Man's Land ! Ar

Priz rann "Ar Re Yaouank" : "Zulu Zone"




Zulu Zone — Eus ar Stadoù-Unanet e teu "emsv" an Hip-Hop. Met abaoe ur peniad mat a amzer dija, hag a-raok ma veje anavezet gant ar mediaoù, ez eus e Breizh eus diskibien an Hip-Hop.

E karter ar Vali Hir e Brest ez eus un emsv tud yaouank, ha meur a strollad a zo bet savet ganto : an Ninga force, ar Zulu juniors.

Dre an dans, ar smurf pe ar break dance, an dorneskivadurioù hag ar sonerezh ez en em zisplegont.

Diwar intrudu daou zen yaouank eus an Ninga force eo bet savet ar film-mañ, hag int ar c'hoarierien anezhañ.




war un dro gant "Ker Is"

Ker Is — Kollet e-kreiz ar vrumenn stank ha gwaskus, mont a ra ar vag diroudet... War he bourzh emañ Grallon hag e varc'helen, o klask Inizi Hanternoz ar Bed, o klask ar bed all, hini mojennou ar Gelted Kozh.

Goude heuliañ ur vran wenn e tih Grallon Koded ar Skierjenn e-lec'h m'emañ Plac'h an Hanternoz o vezañ, hag hi ar plac'h kenedus-bras. Met ditunnañ a ra nerzhiañ tud an enezenn da zegas ar mallozh...

Ruz-e-deod-diskiant, mañ bastard Grallon, a oar ervat e c'hoarvezo ar pezh a c'hoarvezo, Hag aon en deus...

Priz ar gelaouenn "Chasse-Marée" : "Ur Vag o Sevel"



© Le Chasse-Marée

Ur vag o sevel — Evit ar wech kentañ en deus asantet ur c'halvezour bigi, daoust dezhañ disfizout kalzik er penn kentañ abalamour d'an doareoù kuzh ha d'an hengounioù, e vefe ur filmaozer o finiskouden-nih penn-da-benn e labour ; sevel ur vag koad gis gwechall, anezhi ur vag legestra a oa bet adverket an tresoù anezhi gant an amiral Paris e 1867.

E-pad pevar mizvezh, e revont kichen-ha-kichen, esmaet o welout ar vag o vezañ savet, munud ha munud.

FILMOÙ MAT O DJE GELLET KAOUT UR PRIZ



Paotred ar Mimosaz — Danevelliñ a ra "Paotred ar Mimosaz" buhez penetezek pevar soudard kembreat ha penaos e vont embreget, ez ejont war-zu mor Atlantel ar Su war QE2 hag a-benn ar fin war wourzh ar "Galalah". Petra a yeas a-dreuz e "Bluff Cove" ? Chom a raio kuzh ar respont e-pad bloavezhioù.

Klask a ra ar film ober goulennoù reizh hepken.

Evit treiñ beaj ar soudarded da vont d'an Inizi Falklands (Malaouat), ez eus bet feumet ur vag eus ar "Brittany Ferries" gant aozerien genbreatac ar film !

Ur film dispar ha gwir-kenañ !

Sahara ! Ken bev ken n'en dije kredet den mont da bourmen dre aze. Met e-kreiz ar Sahara ivez, ur c'halvezour kaer gant dieturidi ar gevredigezh etrevroadel respont warni ! Ganto ivez, dontontez Kadoudal, nerzh-kalon Pont-kaleg ha spered intrus ar c'hannad m'eo bet Metternick war un dro. Diouzh an Edergen-se e tichape gwech war un tu, gwech war un tu all, ur jubennour bennak leun a volontez vat hag a c'herioù flour. Sachet e vezent a bep tu. Kejañ a raent neuze war an enezennig ken glas. Hag adarre e tichapent gant gerioù seditraouec'h c'hoazh. Test e oa d'an bannieloù gwenn bezañ dispaket. Un nebeut mont-dont c'hoazh... Ha setu anezho o tifloupañ hag o stakañ gant avel ar peoc'h !!!

"Greomp un emvod !"

"Ha setu aze ur menoz mat avat !"

"Mat ! A-du omp e vefe graet e Breizh !"

"Ha setu aze ur menoz dispar avat !"

"Met ma vez graet e Breizh e vo graet e Roaz..."

"Ha nann ! Ma vez graet e Roazhon, ez eomp kuit ha n'ho pes ken dim !"

"O ma Doue, ma Doue ! B'emañ gant adarre !"

"Mat, selaoit un tammig ! Ma fell deoc'h aozañ ar Gouel e Roazhon, hag oc'h gouest da brientañ pep tra ?"

"Beñ... Nann..."

Nag un istor.

"Mat, selaoit mat bremañ ! Aozet vo e Breizh hag ar Poellgor Breizhat an hini zo e karg e aozadur. Ha sklaer eo an traoù bremañ ?"

"Dre vras, setu penaos eo bet dibabet aozañ ar Gouel-se e Breizh."

DISTRO DA VREIZH

Gant kement-mañ war ar stern eo bet ret deomp kregin da brederiañ war ar pelec'h, ar pegouzh hag ar penaos. Ar pelec'h an hini 'n deus lakaet ar reuz da sevel ur wech ouzhpenn. N'ouzon nousept gwech eo aet E. Moallig da Roazhon. Me 'soñj din en deus ankounac'haet ef ivez. Aze 'mañ spered an digreizennañ gant tud 'zo : derc'hel a reer da vont da welout anezho er ger-benn dre ma ne vezont ket gouest d'en em zigreizennañ drezo o-unan. An emvod diwezhañ a voe aozet en Oriant (I) hag aze e oa da vezañ divizet ur wech da vat passat ker he dije degemeret ar gouel. Peder anezho e oa war ar renk : Roazhon, an Oriant, Sant Brieg (daou zevzh a-raok an emvod) hor boa reaset ul lizher eus ti-ker Sant

Brieg ! ha Douarnenez. Eus Roazhon ne oa den 'bet ! Eus an Oriant oa unan deus issekretourien Gouel an Oriant, ar wech kentañ dezhañ klevout anv deus Gouel ar Skinwel hag ar Sinema Keltiek ! Eus Sant Brieg ne oa den 'bet ! Dibabet oa neuze aozañ ar gouel e Douarnenez. Met, ur miz pe zaou warlerc'h, n'ouzon re dre beseurt taol burzhudus, oa ar Gouel da vezañ aozet e... Roazhon da gentañ hag e Douarnenez da c'houde ! Aesañ tra 'vel just ! Kas ouzhpenn kant den eus Roazhon da Zouarnenez !

Diluziet buan e oa kudenn ar pe-goulz. Chom a rae d'ar poent-se kudenn ar penaos. **I mean money folks ! yea, business, money !...** 'Understand what I mean ? Ha dre c'hras Doue hag un tamm mat a aozadurioù (Stad, rannvro, kêr...) e voe diluziet kudenn ar penaos. Ha dav dezhi bremañ !

DIBAB AR FILMOÙ

Soñjal a rae deomp e oa gwelloc'h chom hep drevezañ gouel Kerdiff. Labour ar strollad-barn ennañ en doa troet d'ur seurt redadeg foll dre m'oa devoa bet da sellout ouzh ouzhpenn 100 film bennak, e-pad pemp devezh ha nozvezh. It d'ar sinema un devezh ha sellit dizehan ouzh 13 eurvezh film ! Dre-se hor boa divizet ober un dibab kentañ. Savet e oa neuze ur strollad-barn gant pemp den ennañ : ur Skosat, Richard Kibborn, kelenner war ar fiivskudenniañ e skol-veur Strirling ; ur C'hembred, Rhys Lewis, eus BBC Kembre ; un Iwerzhonad, Paul Cusack, eus RTE ; doue Vreizhad, Roland Michon, deus FR3, ha me. Tost da gant hanter-kant film hon eus gwelet ! E c'hwec'h rann disheñvel e oant : kelfilm (ar brasañ niver a-bell), ijin, tud yaouank, oberenn gentañ, sonerezh a bep seurt ha keleier. Bez' e oa enno div rann gwan-tre : keleier ha sonerezh a bep seurt (*light entertainment* e saozneg). Ha pa lavaran gwan-tre... Dre-se e soñj din hon eus graet ur fazi o virout an div rann-se e-lec'h krouiñ rannoù nevez e-mesk ar c'helfilmoù, ur rann ken pinvidij ha ken talvoudus.

Ar gwir he doa pep kevredigezh pell-wel ha sinema da ginnig ur film e pep rann, da lâroul eo c'hwec'h film dre rann. Ar reolennoù eo bet abaoe m'eo bet savet ar gouleis. Met sur a-walc'h e soñj da lod 'zo eo didalvoud ar seurt reolennoù rak kaset e voe deomp ouzhpenn un daouzek film bennak deus Roazhon ! Ma ! Labour ouzhpenn !

"In Darkness Visible"

Ur film-kelfilm dispar diwar-benn Margaret Watkins, ul luc'h-skeudennerez a vrud bras. Amañ an arzourez o vezan fichet.



"The Cry" — Ur film diwar-benn Iwerzhon an Hanternoz ; savet e istor gant Derek Mahon ha Chris Menaull diwar ur pezh-c'hoari gant John Montague. Amañ, Stella McCuster hag Adrian Dunbar, arzourien er film.



Youc'hadenn — Ur c'hazetenner yaouank o weladenniañ e sioulk a ger c'hennak a zo diunet e-kreiz an noz gant ur youc'hadenn.


Eus e ganibr e wel un den yaouank gwallgaset ha kaset kuit gant e dud.

E-kerz an enklask e steuz kuit an testoù hag e chom diseblant ar vignoned zoken. Nemet o defe aon ?

"Shark hunters of Achill Island"

Morvezhaerien enez Acaill — Abaoe ouzhpenn 250 vloaz ez a poarred enez Acaill, gant o bigi curragh lier deret bresk, da chasat e donvor da gontelezh Vaugheo, a-hed aod ar c'hornôg, mor-yelezi bac Keem.

Kontañ a ra ar film-mañ penaos ez a da get al loened ramzel-se, ha war un dro ul labour dianav a-walc'h : klask a ra ar besketourien eoul-avur ar morvelezi, a vez implijet evit ar wraventerezh hag an ijinerezh.



"Raic", ur film iwerzhonat e gouezeleg, graet gant R.T.E. Netra burzhudus e gwirionez !

Raie — Ul lec'h didud war aod ar C'honamara. Emma, a zo bet tamallet dezhi bezañ bet doareoù dizonest gant ur buge, a zo skarzhet eus he labour mestrez-skol. Kejañ a ra gant ur poar yaouank. Padraic, ha ne ra nemet soñjal e marn e dad-kozh, a voe lazhet gant un obuz degaset gant al lanv e 1917...

Istor ur bobl a vev er peoc'h ez eo, o selou buhez an douar bras e-lec'h ma 'z eus ar brezel (1917... 1942...) Pa n'eus ket kalz a egedoù war an dud gant ar brezel, war a seblant, e gwirionez ez eus gouliou don o tont diwarmañ.

Tri menoz stur a voe roet deomp da varn ar filmoù e o ferzh mat da gentañ, o spred e-keñver ar broioù keltiek hag o danvez. Notennet e vezent unan hag unan, ha da c'houde e veze dibabet ar re a oa da vezañ o kenstrivañ, ar re a oa da vezañ diskouezet met hep kenstrivañ ha da zrivezañ ar re a oa da vezañ kaset en-dro ha buan ha buan d'o bro ! Ret mat lâroul e teuas ar Bro-Skos oa mat-tre e-keñver labour aozañ ha filmañ, a-wechoù gwelloc'h eget re Bro-Gembre, met lod anezho e-keñver spred ha danvez a oa un tamm mat gwanoc'h. Bro-Iwerzhon he doa kaset filmoù mat a-walc'h o soñjal dozho e oant dispar. Filmoù Breizh ? Ma labour zo c'hoazh war ar stern ! Setu echu barn ganeomp ha savet roll ar filmoù o kenstrivañ hag hep kenstrivañ, A-drugare da gevredigezh an ACAVE e Sant Kadoù hor boa bevet un devezh dudius ha plijus-bras. M'ho peus tro da vont d'ar c'horn-brose, it da weladenniañ an ACAVE, e Sant Kadoù, rak talvezout a ra ar boan ha war un dro e vez desket kalzik traoù a-zivout an aozañ filmoù ; hag ar c'hilwevel dre-wras. Etebuz hag ampart tre int. Echu gant ar bruderezh !

AN AOZADUR

Ret mat e oa deomp neuze plediñ gant ar brudañ hag ar skignañ ha gant skoazell efedus Duncan McLeod, sekretour ar Gevredigezh Etrevoudell, e oa kaset an traoù war an hent mat, sioulk ha sioulk. Amat eo e oa diaes-tre bras an traoù dre ma oa ar gouel da vezañ aozet da gentañ e Roazhon hag e Douarnenez da c'houde, dreist-holl, dre ma oa reuzedik-kenañ niver an dud prest da reiñ skoazell er gêrbenn. Bemdez e save kudennoù lies-seurt da ziluziañ : ar re gozh hag ar re nevez. Ar re gozh gant an hevelep tud bepred, ar re nevez gant al lojañ, ar bodañ, ha me oar-me ! Met tamm ha tamm e oa sklaer-gar ha diluziet anezho. Unan anezho a oa ur gwall dorpenn : penaos degas ur c'hanad tud 'bennak deus Roazhon da Zouarnenez pa ouzer n'eus treñ ebet eus Kemper da Zouarnenez abaoe 1972 a soñj din ? Gant Douarnenez, tud prest dalc'hmat da c'hanadhin goap, e vez kontet an istor-mañ :

"Ha goût a rit petra zo erru en tigar ?"

"Nann 'vat ! Petra 'ta ?"

"Un treñ !"

Ha deut ar farsadenn da wir ! Un

treñ a erruas e Douarnenez evit digeriñ ar gouel enni. Ha kalzik Douarneneziz a yeas betek Kemper da lammat en treñ. Ha dirak dileuridi un tamm sko-deget e voe gronnet an treñ a dropella-doù bugale enervet-mik. Sofijit 'ta. Ar wech kentañ en o byhez mont e treñ Kemper-Douarnenez !

Met daoust d'ar seurt Gouel kaout ur strollad tud o reiñ ur priz d'ar film gwellañ e pep rann aozet e vez ivez divizoù liesseurt diwar-benn ar broioù keltiek ha war an hevelep tro ur seurt marc'had evit ar filmoù. Dibabet hor boa er bloaz-mañ reiñ oberennoù arzourien vreizhat da briz. Priz spered ar gouel a oa profet deomp gant Mirdi Roazhon 'lec'h ma c'heller kavout Douez ar Menez C'homme, Brech'ned. Gwall dristik hor boa kavet ar prizioù kinniget e Kardiff.



"Brec'ned ar Menez C'homme"
Priz bras "Spered ar Gouel"
roet da Vark Evans evit
"Johnny Be Good"

Rebechet eo bet deomp chom hep bezañ diskouezet an darn vrasañ eus ar filmoù o kenstrivañ. E-doug ar pevar devezh e chome d'ober al labourat sirius goude an daou zevezh tremenet e Roazhon, seurt aozadur a seblante deomp dibosupl a-grienn. Pe neuze hor bije dleet kaout teir skouerenn eus pep film : unan evit ar strollad-barn, unan

"Workhorses", ur film mat-kaer !

Marc'h-labour - Istor ur strollad tud yaouank eo, hag int o paouez kuitaat ar skol hag o vevañ dilabour. Lavaret e vez diwar o fenn ez int "tud diaes", ha lakaet int da labourat e-giz liorzhourien, gant tud a glask krouiñ implijou-labour.

Ouzal a ra ar re yaouank, met lakaet int da labourat a-benn ar fin, gant o animatour kozh, ur mailh war ar vicher. Sañset int d'ober war-dro ur marc'h bras-tre ha gouenn ennañ, "Clydesdale", ha n'eo ket war-dro liorzhouriezh ez eo. Evit o brasañ levezet e c'houtez ar marc'h ur redadeg vras, met siwazh ne blij ket nemeur o entan d'ar pennou.



"Strin Searching"

Ur c'hellfilm aozet gant an Derry Film Co-op diwar-benn an doare mezhus hag heugus ma vez furchet an dud (hag ar gatoliked dreist-holl ! Nag ur souezh !) e toull-bac'h Bro-Iwerzhon an Hanternoz. Gallet en dije bezañ graet gwelloc'h met santet mat e veze an diouer a arc'hant e aozadur ar film. Da vevañ gwelset evit ar re dedennet gant kudennoù a-vremañ Iwerzhon an Hanternoz.



"Reun Skeren"

Aozet gant Per ar Flaou, FR3, ar c'hellfilm-mañ a oa o kenstrivañ. Graet mat ha dedennus da welout.

Reun Skeren - A-aviskoazh e voe ar blienn eil benveg *Reun Skeren*, ur mitcherour anezhañ, mekanikour arbennik, boemet gant al lennegezh a-vremañ.

Ennañ ar youl da grouiñ e brezhoneg evit "argan Ankou" en deus c'hoant Reun Skeren da gentañ penni, pa sav troidigezhioù, kenlodañ gant ar vrezhonegerien all ar blijadur a zo gantañ o lenn skrivagnerien evel Sartre, Miller, Prévert.



"Retraite"

Priziet e Douarnenez e 1984, savet gant Michel Dupuis hag embannet gant an A.R.C. Ur film mat met hep kalzik nerzh.

War e Leve - Ur gériadenn e Breizh, An devezhioù diwezhañ a-raok mont war e leve, ket un darvoudenn zoken.

Padal... unan o vont kuit : ar mestr-skol. Un ti klozet, e skol. Un disbetez tapet e lec'h all... gant ur veistradurezh, ur burev bennak.



AN DIVIZOÙ

Dalc'het oa an divizoù e sal vras kuzul-kêr Douarnenez. Hag evel 'm eus tro d'hen ober bremañ e karfen ur wech ouzhpenn trugarekaat ti-kêr Douarnenez evit al labour start hag ar skoazell ampart en deus roet deomp hag an degemer ken hegarat roet da zileuridi ar gouel. Hep ur skoazell ken brok e vefe bet kalz startoc'h aozañ anezhañ a dra sur. E Roazhon o doa an dileuridi kaozeet diwar-benn an teknologiezhioù nevez hag ar pellwel hag an digreizennañ er broioù keltiek. Diaes oa da lod zo bezañ en o bleud sur a-walc'h. Seizh anezho a oa dalc'het e Douarnenez : d'armpredioù an dud a vicher ; kenlabour ha kenembann ; ar skignañ hag ar gwerzhañ filmoù ; micher an embann filmoù ; skoazelloù prevez pe a-berzh Stad ; ar vuqale ha bed ar c'hlevgwel ; stummadur war vicherioù ar c'hlevgwel ; keloù mat a-berzh ar broioù keltiek ha da echuiñ sevenadurioù, yezhoù keltiek hag ar c'hlevgwel. Meur a hini a zo bet souezhet gant an niver bras a dud a voe eno o selaou outo hag o klask resisa-durioù liesseurt.

AR FILMOÙ

Er bloaz-mañ ivez, a-drugarez da embannadurioù ar "Chasse-Marée" ez eus bet roet ur priz muioch'h : hini ar gwellañ film o tennañ d'ar mor. Hag ur film breizhat an hini eo aet ar maout gantañ : "Ur vag o sevel" (Naissance d'un bateau) aozet gant F. Variot hag embannet gant M.J. Corajoud. Ur film aes e raktres met kaer-kenañ e spered. N'eus bet roet priz ebet en ur rann dre ma oa paour a-walc'h an darnvez kinniget enni. Diaes eo krediñ met war, a seblant ne c'hoarvez ket kalz tra er broioù keltiek ! Rann ar c'heleier, neta tout ! Marteze e vez dismeañset an darvoudoù a-vremañ gant ar c'hlevredigezhioù Stad ? Piv oar ? Merzout !

reer memes tra e vez aozet filmoù keleier er broioù keltiek all, gant aozadurioù prevez dreist-holl, sur a-walc'h dre ma vezont diu-poc'h, Harz-labour ar venglezerien da skouer. Tri film kinniget nemetken hag an holl anezho aozet gant kevredigezhioù prevez ! Diaes krediñ met gwir eo !

Gant "Silence to Silence" ez eas an trec'h e rann ar c'helfilmoù, Priziet meur a wech dija, e Glasgow, e Londrez, en Edinburgh, hag all ; kontañ a ra istor Samuel Beckett, ar skrivagner iwerzhonat ken brudet. Met ken pinvdik e oa ar rann-se ken e vije bet tu da reiñ ar priz d'ur c'helfilm all, "An artist on every corner" eus Kerneveur. "In camera" a Vro-Skos, "Another Island" a Vro-Iwerzhon, "In darkness visible", "In search of Sawrie Bean", ur film fentus-kenañ hag aozet mat-dispar eus Bro-Skos, "The oldest rebel" a Vro-Skos a gont istor un emsaver a gant vloaz. Pinvdik-kenañ e oa ar rann-se eta ha ret eo pleidiñ gant divizoù ar strollad-barn. Met krediñ a ran eo brud Samuel Beckett en deus lakaet anezhañ da zibab ar film-se da gentañ. Dav eo lavarout ivez e oa ar wech kentañ d'ur film manavek bezañ kinniget. Savet e manaveg penn-da-benn e tiskouez istor ha stad ar yezh en Enez Vanav a-vremañ.

Gant "Zulu Zone" e voe priziet an ACAVE eus Sant Kadoù evit rann ar sonerezh, ur film bet savet gant an dud yaouank o-unan, e karter ar Vali Hir e Brest.

Priz ar filmoù ijin a yeas gant "The Happy Alcoholic", ur film kembreat savet gant Carl Francis ha gant "The Fasting Girl" savet gant Robin Rollinson diwar ur istor gwir c'hoarvezet e Bro-Gembre e 1860.

Gant ur film kembreat c'hoazh ez eas ar maout evit rann an "Oberennoù kentañ", "Johnny be good", savet gant Marc Evans, ur filmaozer yaouank a Vro-Gembre, leun a venozioù hag a berzhioù mat, a gont istor an troc'h etre div gevredigezh war ar maez e Bro-Gembre, pa zouguezh ur "juke-box" ar vorc'hadennig. Ken mat e voe kavet ar film ken e voe priziet ivez evit priz ar Gouel.


Start eo bet sevel seurt gouel e Breizh dre ma'z eus bet klasket kinklañ an traoù gant asant an holl. Di-c'hallus e seblante bezañ, met dre vras eo bet tizhet ar pal-se. Ur seurt burzhud pa ouzer pegen figus ha flemmus war un dro e c'hell bezañ tud ar c'hevredigezhioù pellwel Stad. Ret eo bremañ hetin berzh-mat da ouel New-castle en Iwerzhon er bloaz a zeu hag hetin ivez gwelout un niver mat a Vretoned ennañ.

"Chegev ny Mavrey"

Ar film manavek kentañ ? Daoust da ziouer a vicher e aozerien, eo pouezus gwelout eo bet graet seurt film diwar-benn istor ha yezh enez Vanav evit ar wech kentañ.



Ned Maddrell (e-kreiz a-gleiz) gant Eamon de Valera e ti-plouz Harry Kelly, Cregneash e miz Gouere 1947. Ar bloavezh goude e kasas E. de Valera an "Irish Folklore Commission" da enrollañ ar manaveger diwezhañ.



John Kneen eus Ballaugh, marv e 1957 da 105 bloaz. Kalzik eus an istorioù kontet gantañ zo bet implijet evit aozañ ar c'helfilm.

HERLE DENEZ

Bannoù-Treset

GI EDER FONTANELLA

LOEIZ AR C'HERE



© Casternan-Altan

COLOMBO-OHO !

"Wao !" am eus lavaret, e dibenn miz Ebrel, pa lennis e oa Colombo, gant Atlan, o paouez dont er-maez. Enkrezet e voen pa zispakas al levraouer ur gasedad levrioù Treset evit tapout din ur skouerenn eus ar *Cholombo-se*. Lennet em boa an istor dija, a viz da viz, ha gant plijadur. Ha bourrañ a rafen adarre ouzh e lenn ? Ne voen ket disouezhet.

Un Itallad eo Altan, evel Pratt ha Crepax, unan a-zaore evelto. Bannoù-treset all diwar e zorn a zo bet moulet e Bro-C'hall : *Fritz Melone, Ada*. Anavezout a reer ivez e levrioù skeudennaouet evit ar re vihan, hag e dresadennoù politikel. Ar re-mañ a zo bet embannet un dastumad anezho warlene, dindan an anv a *Cippiti*, gant Artefact. Ar Cippiti-se a zo anezhañ ur micherour kozh, a zistag a-wechoù bommoù evel : "politikezh ar penn-bazh hag ar garotezenn, ar penn-bazh war ho penn, hag ar garotezenn e toull ho reer". Un oherezhz dellezek eus pajennoù *Pabl Vreizh*, — hep farsal. Kempouezet e vez ingal an dro-spered lousse gant ur gizidigezh don. N'eus ket par da Altan evit tresañ oablou du ha steredennet. Taolit ur sell war niv. 31 "Al Lanv" p. 29, el laez. Fromus eo.

Anvet em eus ar pennad-mañ *Colom-*

bo-oho evit tostaat levr Altan ouzh pezh-e-hoari Jakez Riou. Kar int. War an hevelep danvez o deus pleustret an daou aozer : istor un den meur o seveniñ ur menoz dibar dindan lagad go-paus tud dister o ene, ha denel-tre koulskoude. Ne gredan ket e vefe feuket gour gant skrid Riou, nemet ar re a zo manet feuket abaoe 1935. Mes feukañ a ray al levr bannoù-treset nevez-mañ tud, a vefe bet feuket hanter-kant vloaz zo gant Riou, ha n'int ket ken, hag a erede, abalamour da se ez int ledan a spered. Da Altan eo rebechet bezañ lous ha divalav ha vil e dresadennoù, en abeg d'an amprevaned puih ha d'ar barradoù dislonkañ. Un tamall direizh e vo, rak Altan, evel ma lavaren, a zo un treser a-zaore.

Ar brezhoneger, evel just, ne gavo ket amañ yezh kaer al Loteiad. Digollet e vo neuze gant an tresadennoù. Meneget em eus a-us an oablou du hag ar stered, Anv a rin amañ eus ar bolomigoù. Mar bez divalav-tre ar re zivalav, e vez koant-tre ha kaer-tre ar re gaer hag ar re goant. Sellit ouzh ar mere'hed, du a vlev, gwenn a groc'henn, ha kuhl un dudi. Taolit sellou flour evel allzigoù war an Indiamed blou'h ha balc'h, war ar mousig tener ha melegan, un dudenn wirion anezhañ, ha gosha a-hed an istor. Amañ emañ moarvat perzh dibar *Colombo* : gwir dudennoù a zo eus ar bolomigoù

bleuniet evel un nevez-amzer diouzh ene un den. Ha pa weler kement-hakement a vannoù-treset didalvez brudet gant ar c'hiz rock 'n bull, e vezer pijet o kaout ur *Cholombo* da lenn ha da tollennata.

"Wao !" a lavaren uheloc'h, Gouzout a rankit e vezan, war ar pemdez, ken sarr ha drantik hag abadennoù R.B.O. Div wech hepken on bet gwasket en un doare taer a-walc'h evit distagañ ar sllabennou-se. Ar wech kentañ a voe e 1975 pa lennis *Chinook*, levrinn gentañ rummad Buddy Longway, troet diwezhatoc'h e brezhoneg. An eil gwech a voe da ghevez donedigezh er-maez *La fille sous la dunette*, levrinn gentañ "Les passagers du vent", gant Bourgeon, deuit da chom e Breizh. Spij am eus e ray *Colombo* kement a berzh hag an daou levr-se.


Altan, Colombo, Casternan, Les Romains (A Suvre), 124 f., 64,00 ltr

KLOK


Ken hollandat eo Willem ha m'eo Altan italianat. E Pariz emañ o chom avat, ha skrivañ a ra e galleg. Stank e vez ar fazioù-yezh en e skridoù. — unan e pep pennad d'an nebeutañ. Ha saourus int ! Un tañva evidomp eus pezh a vefe brezhoneg Roparz Hemon

Il paraît que tous les lecteurs de Yod Ker'h (bouillie d'avoine) s'exercent en français en lisant Charlie Hebdo mais qu'il y a pourtant des lecteurs bretons de CH qui ne connaissent pas ce journal breton plein de bûdes bretonnes, poèmes bretonnes et nouvelles bretonnes (adresse je le vous donne comme je l'ai reçu: pas compris le breton):
 KOMEZ HAG ARZ BREIZHEK
 BP 1305 RENNES Villejean
 35016 Rennes Cedex 6az 10FRANCS

Ur skouer eus ar pezh a rae Willem :
 un notennig azivout e Yod-Kerc'h




© Yod-Kerc'h



© Casterman-Tardi



© A.U.D.I.E.-Lelong



© Willem

evit ar vrezhonegerien a-vihanik, ma vefe ken digor spered an Emsav ha ma oa hini "Charlie-Hebdo". Rak war ar gelaouenn-se eo e voe moulet, a sizhun da sizhun, ar pennadoù burutellerzh dastumet amañ.

Plijout a ray an dastumadenn, da gentañ, d'ar re a gav gwel pleustrañ war ar c'helaouennoù aet da get eget lenn ar re vev, — re c'hlas int, hervez. Gant aked ha karantez e vrudas Willem diskouezadegoù ha mouldadurioù ar sevenadur underground, pe gensturiek. Anv e veze graet a-wechoù eus ur gelaouenn vrezhonek bennak ha morse n'en em vanke an Hollandad evezhiek oc'h adskrivañ ar bommoù keltiek. Aketoc'h e veze enta eget darn eus kenlabourerien hor c'helaouennoù rannveol, — ha pa ouzer ez eo stag an aked ouz ar garantez e c'heller gouzekaat ez eus amañ tud digar e-keñver o bro.

Anavezout a rit Janus, unan eus doueed ar Romaned. Henezhz en doa div zremm, an eil troet war-du ar bloaz nevez, hag eben troet war-du ar bloaz kozh. Tennañ a ra oberenn Willem d'an doue-se. Skrivet eo bet ar pennadoù kentañ dindan levezon ar bloavezhioù 60, peurechuet e voe ar re zivezhañ dindan beli ar bloavezhioù 80. An holl zoueod o deus ur galloud : hini Willem a zo unvanit tregont bloavezh a sevenadur hag a grouidigezh.

Treser eo Willem ouzhpenn. Ne vez ket stank koulskoude e dresadennoù en oberenn, mes dornskrivet e veze ar pennadoù, hag o zalbenn a gemme o lizherennoù bep tro. Paotr-al-lagad a

adkaver dreist-holl e dibab ar skouderioù stank. Buhezkaet e vo lagad meur a hini gant keja-demmoù divoas, etre bolomigoù Robert Crumb ha re Olivia Clavel, etre bolomigoù ar rummad beat ha re c'hlan Joost Swarte.

Un oberenn evit ho levraveg hag evit ho taoulagad eo. Talvezout a ra ar boan enta atahinañ ho levraveg d'e lakaat da zineizhiañ ur skouderenn evidoc'h. Un index a gavot ivez e dibenn an dastumadenn d'o skoazellañ pa enklaskot.

Willem, *Complet, La revue de presse de Charlie-Hebdo, 1969-1971, Humanoïdes Associés, 304 f., 75,00 lur.*

AR C'HERE

ICI-MEME
 Forest/Tardi
 (Casterman)

Embannet eo bet "Ici Mème" e 1979 met n'eo ket un abeg evit ober ho peg figus. Savet eo bet istor ar paotr-kaezh Arthur Mème gant J.C. Forest en deus diskouezet meur a wech bezañ un den a ijin hag un tresour ampart ivez. Anzav 'ran, ouzhpenn-se, ez eo Tardi unan eus an dresourien B.T. a blij din ar mutiñ. Da lenn ivez, "Brouillard au Pont de Tolbiac" treset gant Tardi hervez levr Léo Malet ha "La Jonque Fantôme vue de l'Orchestre" gant J.C. Forest.

LEONID ROSKO-POUDING

KIDS

Unan eus treserien BT heverkañ ar bloavezhioù diwezhañ-mañ zo hep mar Arno. Ur mist eo evit al lenner heuliañ e istorioù gant ar sklaer ha fresk eo e zoare da dresañ. Befek-henn n'en doa graet nemet skouderioù istorioù bet savet gant tud all evel ar rummad Alef-Thau (gant Jodorowsky — aozer ar film "Ar Menez Sakr" ha testener ar rummad John Difool — treset gant Mœbius). Menegomp ivez gant an ul levr dispar evit ar vugale embannet gant Okapi "Le Chêne du Réveur". Ar wech-mañ gant "Kids" hon eus tro a-benn ar fin da lenn ur rummad istorioù berr — 8 en holl — bet savet gant e-unan, hag e gwenn ha du mar plij ! En holl istorioù-se e kaver bed Arno, da lavaret eo, buhez bugale ha krennarded o vevañ en ur bed n'eo ket graet evite, bed ar re vras, ur vuhez bremet gant an droug, ar brezel...

Spi hon eus e kendalc'ho Arno da sevel testennoù hag e kavo an tu d'o zresañ gant e zoare dezhañ e-unan.

Arno, *Kids, Les Humanoïdes Associés, Col. Pied Jaloux, 48 p., 50,00 FF*

COPY-REVES
 Jean Teulé
 (Glénat)

E 1983 en deus embannet Jean Teulé e levr kentañ : "Bloody Mary" hervez Jean Vautrin, romantour "du", alias Jean Herman a skriv senari evit ar sinema ("Rue barbare", hag all). Meur a lister a gaver e-barzh "Copy-Revés" met n'int ket holl deus an hevelep live. An teknik avat a zo souezhus. Kalz tostoc'h eo deus al livañ eget deus an tresañ. An doare en deus Teulé da labourat (luc'hskeudennoù, fotokopioù, hag all) a zegas d'e ar un draig ouzhpenn, a gav din. Dedennus.



© Glénat-Teulé

CARMEN CRU
 Lelong
 (Fluide Glacial)

Emañ "Fluide Glacial" o paouez lakaat eil albom "Carmen Cru" da zont er-maez, "La Dame de Fer". An albom kentañ oa bet kinniget d'al lennerien e miz Gwengolo 1984 ("Ren-



© Casterman-Altan



© Dargaud-Gibrat
GOUDARD

An istorioù-mañ n'int ket gwall vrudet, daoust da se ez int mat-kaer. Ur c'hrennard eo David Goudard, o chom e Paris emañ. E dud a zo istroglled, e dad a zo ur mon beauf hag e vamm a vez bepred war-dro he c'hastolodennoù pe o lenn "Nous Deux". Goudard a gav hir e amzer : etre ar skol hag ar

gêr ez a da straniñ er ruioù kêr, en ostalerioù, klask merc'heta merc'hed e glas (arabat kaout aon, netra da welet gant filmoù Marcel Dassault !) pe c'hoazh mo* da dremen vakansoù nui war an nod. Ar pezh zo, Goudard ne ra nemet dekonñ, hag a bep seurt istorioù a c'hoarvez gantañ.

Ar pezh zo mat gant Berroyer ha Gibrat eo gwir pep tra en istorioù, spered ar grennarded, o yezh, o doare d'en em zerc'hel, pep tra kwita (evel ma'n boa lavaret deoc'h...) — manñ n'eo bet ijinet. Ouzhpenn-se eo fentus an istorioù, petra goulnn ouzhpenn ?

Berroyer/Gibrat Dossier Goudard, La Parisienne, Goudard et la Parisienne (Dargaud) C'est Bien du Goudard (Fluide Glacial)



© Dupuis-Tillieux

GIL JOURDAN

Ar sonerezh rock a-vremañ zo kazus, dipitus ha skuizhus. Selalout ur radio prevez un devezh-pad (n'eus forzh pe-hini koulz lavaret) hag e vo un distan deoc'h mont da selout ur 'Beatles' pe ur 'Rolling Stones' bennak... Ar memes tra a c'hoarvez gant ar BT hag un drugar eo, ur wechig an amzer, adkavout seurt levrioù hon eus bet tro da adlenñ ha da azlenn pa oamp yaouankikoc'h, Dupuis en deus bet ar mennoz simpl — met dispar — da adembann holl levrioù Gil Jourdan. Ahh... penaos

ezeurel ar pezh a santomp en hon c'hreiz ar ur lenn troioù-kaer an detektiv dindan pluenn ha fent M. Tillieux ? Ur 403 o karzhañ war-lerc'h mestr bras an opium... dockoù ha kêrioù bras ar bloavezhioù '50... Aze e oa ar skol velgiat en he barr. Evel just gant red an istor eget gant ar peurrest. Da skouer, en istor o tremen e Breizh, "La Voiture Immergée" e weler a bep seurt traoù diwir pe zoken faos. Gwellet e vez da skouer pesketaerien oc'h evañ sistr !... Kement-se zo imposibl evel just ! Met ne vern... "Kanata" da savet gant skoazell tonelladoù a dielloù hag a levrioù discoch, arabadusañ levr ar bloavezh ! Ijin, fent, arz, aze emañ an dalc'h ! Hiraezh yac'h koun hon bloavezhioù disouris a raio ar peurrest.

M. Tillieux Tout Gil Jourdan I, Dupuis, 160 p., 75,00 FF

GIEDER FONTANELLA

Sonerezh LED-ZEPPELIN



Bonham, Jones, Plant, Page (Led Zeppelin e 1969 - Los Angeles)

Brudet eo abaoe un toullad bloavezhioù ar strolladoù rock kalet (pe "heavy metal" ma kavit gwelloc'h). Dizoloet Van Halen hag ar yaouankizoù da vont droc'h ! Chom a ra an dud talbaget dirak Scorpions pe enkrezet o klevout Bon Jovi, Ha koulskoude ! C'hoariet eo bet ar seurt sonerezh gwechall (ha gwelloc'h !), gwechall-gozh, e-doug ar bloavezhioù '70 gant ar strollad Led Zeppelin, da skouer.

Penaos eo bet savet Led Zeppelin


E miz Gouere 1968 e tispart ar strollad Yardbirds hag en em gavout

ra ar gitarour Jimmy Page e-man. Fellout 'ra dezhan sevel un doare sonerezh a vefe hengeoulet (Pentangle, Joni Mitchell, the Incredible String Band a blij dezhañ) met rock ivez war un dro. An doare gwellañ da zont a-benn : krouñ ur strollad.

Kavout 'ra John Paul Jones evit ober war-dro ar gitar boud. Diskoachañ ur c'hanour a voe diaesoc'h, Sonjal a reas e Rod Stewart, Steve Winwood, Joe Cocker, Chris Farlowe met nac'hañ a rejont. Klevout a reas Page komz eus ur c'hanour yaouank deus Birmingham a gané gant ur strollad dianav, Hobbs-tweedle, Robert Plant oa e anv ha dont 'raas da vezañ kanour Led Zeppelin.

Dav oa kavout un tabouliner. Page a anavez ur paotr en doa c'hoariet gant er strollad "Crawling Kings Snakes", ha setu kavet an tabouliner : John Bonham, alias "Bonzo". Krouet ar strollad, ne oa mui ken leuniañ ar salioù da ober. E miz Here 1968 e voe diskouezet Led Zeppelin evit ar wech kentañ e Skol-Veur Surrey : 400 dollar ha nebeut a dud. Divizout a reas neuze Peter Grant, manager Led Zeppelin, treuzañ ar mor Atlantel e deroù 1969 goude bezañ sinet gant... Atlantic Records.

Merc'hed, Alkol ha dollaroù e-leizh



Jimmy Page o studian e sokennadur... (1975)

KOUSK BREIZ-IZEL

(Eliane Pronost)

Ken koulz ha Tina Turner, emañ hon Eliane Pronost ni oclh ober ur "come-back" eus ar re blijsañ... Bepred emañ en he c'herzh he mouezh ken hoalus ha ken strobiniellus, par da hini ar morganezed a vez o neukal tro-dro d'enez al Loc'h en inizi Glenan. Hep mont re bell ganti e c'heller zoken lavaret ez eo Eliane Pronost da Vreizh ar pezh eo Maria Callas da Vro-Spagn... Ur wezh laketa ar glasvaen-azia da vale war goar ho pladenn, e savo tro ha tro mouezh Eliane gwezh krenv evel tonnoù ar mor o fregañ reier ar vro Bagan, gwezh dous evel lizennig, miz Mae o flourikat e-kichenik Pont Aven.

Liesseurt ez eo danvez ar bladenn kinniget dimp amañ. Heuliet en un doare disi eo Eliane gant ul laz-seniñ renet gant Herri Beho (hemañ an deus sevenet ar bladenn ivez), laz-kanañ Penn al Lann (eus Laz) hag ivez, evit tammoù zo, gant ul laz-kanañ kembreat (hini P'willhwidy).

Ar pezh n'am eus ket komprenet mat eo perak e vez kavet an darn vrasañ eus ar c'hanaouennoù e galleg bre-mañ (daoust mar dint hengounel) — an diskan nemetken o vezañ e brezhoneg. Gouzout a ran mat eo displeget kement-mañ war c'holo ar bladenn gant Herri Beho "ret eo bezañ komprenet gant an holl" emezañ.

Gant plijadur evlket e vez tro da selout "Brall va c'hloc'h", "Me zo kousket e-kreiz an noz" pe c'hoazh "Deus ganin e toull an noz"... Echuñ a ra ar bladenn en un doare dreist, un tamm jazzy, un tamm rocky gant "Bro Leon, bro va c'halon".

Spi hon eus e kendalc'ho c'hoazh e-pad pell Eliane Pronost da ginnig dimp oberenoù evel-se evit plijadur ar Vretoned diouz un tu ha plijadur an divskouarn diouz un tu all.

Eliane Pronost "Kousk Breiz-Izel" (Chansons de Bretagne et d'Occident Christian) Maaux Breiz, niv. 69.1532

GI EDER FONTANELLA

Buan e teuas patred Led Zeppelin da vezañ brudet evit o buhez diroll, o mezvadegoù, o fouzhadegoù, ken e oa diaes dezho kavout bod en ostalerioù bras. E Los Angeles, da skouer, e veze kaset ar vuizianed d'ar "Château Marmont Hotel" peogwir e oa eno ur bungalow bennak pell diouz ar glianted all...

Divizout a reas kouskouded Led Zeppelin bevañ e Los Angeles. E 1969 e voe enrollet ganto o eil pladenn hag an teirvet hini ar bloaz goude "Led Zeppelin III", un doare folk dezhi. Rebechet e voe d'ar bladenn-se bezañ gwall henvel deus labour Crosby, Stills, Nash & Young. Holl ganaouennoù "Led Zeppelin III" a oa bet savet e Plant. Aze eo bet savet unan eus kanaouennoù brudetañ ar strollad: "Stairway to Heaven". "Physical Graffiti" e 1974, un ti-emban pladennoù "Swan Song Records", hag emgannoù e-leiz: 1975 a voe bloavezh spontusañ ar strollad: gwallzarvoudoù, divesker pe vizied torret hag all. Ne voe ket graet kalz a dra ganto (ur film kouskouded, diwar-benn ur sonadeg, "The Song Remains the Same" e 1976).

An diskar

E 1977 e krogas Led Zeppelin un droiad er Stadoù-Unanet, e Dallas. An droiad amerikan diwezhañ e oa da vezañ. Fall-fall e tremenas an traoù, Jimmy Page a veve a-hed an

deiz en dandenvallijenn ha ne oa mourse heron a-walc'h evit e goust. Ouzhpenn-se e varvas mab Robert Plant. Etre 1977 ha 1980 e vevas ar strollad un diskar gortek, gant brudoù fall diwar-benn an den-man-den. E 1979 e voe embannet o fladenn diwezhañ "In through the Out Door" dindan beli John Paul Jones, an hini nemetañ n'en doa ket kollet e benn. Degemeret mat e voe ar bladenn ha spi o doa Led Zeppelin adsevel pa varvas "Bonzo" John Bonham (oadet 31). Divizet en doa Bonzo paouez gant an drammoù kalet met, siwazh dreistevrad (overdose alkohol) e voe taget ha lazhet — evet en doa 40 gwerennad vodka e-doug daouzek eurvezh: kalz re hervez ar vedisineed, pa oa bet mouget dre e gousk gant e zisionkadennnoù. Ur miz goude e tivize Led Zeppelin paouez ha dispartiañ reas ar strollad peogwir ne felle da zen ebet kenderec'hel hep John Bonham.

TIM OGUBOUL



Filmoù

2

HAG UN TOULLADIG FILMOÙ ALL



C'HOAZH !...

DIVY KERVELLA

"Another Island" : ur film iwerzhonat.

Fellout groñs a rae d'an aozer kaout ur priz ! Daoust da gaerder ar film ha d'e dalvoudegezh istorel n'en deus bet hini ebet !

Un Enezenn All - Dilezet e voe enez Blasket Veur e 1953 ha rediet hec'h annezidi da vont d'an harlu e Dán Chaoin. War filmoù ha luc'hskeudennoù diellek dibaot e weler an enezenn e penn kentañ ar c'hantved.

Gwelout a reer kalz a enezidi er film-testiñ-se, a veul herezh lennegel ha sevenadurel marhus ar bobl-se.



Ur c'helfilm kembreat mat "Turning Pro"

War ar skeudenn : Tony Borg, ar paotr yaouank a c'hoari er film, gant Claire Pollak, aozer ar film.

Mont war ar vicher - Ur film diwar-benn emzornataerien yaouank eus kreisteiz Bro-Gembre eo hennezh. Nebeut a dud hepken a c'hell gouini ar hant gunt ar sport gwadek ha feuls-se.

Ar film-mañ a heuilh emzornataerien yaouank o stourm evit kaout brud, o tisplegañ plas ar merc'hed en o buhez, o sellout ouzh ar bed emaint o vont ennañ, ha goulenñ a ra hag-er e talvez ar boan.



Koumanantiñ a ran



EVIT 6 NIVERENN

Anv: _____

Chomlec'h: _____

KOUMANANT REIZH

A DKOUMANANT SKOAZELL**

*70 lur **adalek 100 lur



MARV EO GORBATCHEV.



SOUEZHET EO JOB TI-PLAÑCH!



MARV EO KOMEINY.



KONTANT EO JOB TI-PLAÑCH!



MARV EO...



N'EO KET TRIST JOB EVIT KEMENT-SE!

